


EMSAV



KELAOUENN BOLITIKEL

MIZIEK

Niv. 39 - Meurzh 1970

An niverenn : 2,00 F

Koumanant-bloaz : 20,00 F

Deraouiñ a ra ar c'houmanant e miz Genver

EMSAV

30, Place des Lices, 35 - RENNES,

C.C.P. RENNES 2 460 10

T a o l e n n

Ar varksourion hag ar vroad. III.- V.I.LENIN	p. 71
An Emsav hag ar Vro (24) [EMVR-140]	p. 96
Danevelloù obererezh : Kentelioù nevez embannet gant S.A.D.E.D. p. 96.	
Notennoù politikel (12), Framm ar riezoù. II.- Riezoù kevreadel (diwezh). III.- Riezereadoù	p. 97

AR VARXSOURION HAG AR VROAD

III. - V. I. LENIN

LENIN eo, e-touez an holl varksourion, a bledas ar muiañ gant ar gudenn vroadel. E-doug an ugent bloavezh a yeas e-biou etre e bennad war an Iskra : Ar gudenn vroadel en hon raklun e 1903 hag an notennoù berrskrivet e 1922 war Kudenn ar broadelezhioù pe an "emrenerezh", ez embannas un torkad mat a zisplegadenoù, tezennoù, kemennadurioù, prezennoù, galvadennoù ha lizheroù o pleustriñ war devoù broadel fetis. Koulskoude, mar dispignas preder ha nerzh e-leizh war an danvez broadel e voe hogos en desped dezhañ. Aet evit ren stourm ar renkadoù e kavas buan war e hent stourm ar broadoù. Ha dav e voe dezhañ sevel, ma n'eo ket un damkaniezh varskour eus ar vroadelezh, da nebeutañ ur gadouriezh a-benn diwall kamp etrevroadel ar broleterion diouzh argoll ur bruzhunadur broadel.

Ha setu dreist-holl ar pezh e voe ar vroadelezh evit LENIN : un dañjer evit unvaniezh ar broleterion. Sokialourion 'zo, evel Otto BAUER, a glaske lakaat ul liv marksour war an talvoudoù broadel; re all, evel STALIN goude an dispac'h, a strivas da enframmañ an devoù broadel er reizhiad soviedel nevez savelet; hag an embregadennoù-se, imbroudel pe leviadurel, a endalc'he o fleustrerion da zanken un "damkaniezh" eus ar vroadelezh. LENIN, en eneb, ne voe nepred un damkanour eus ar vroadelezh : un daelerezhour eus an dispac'h proleterel e oa ha ne voe netra all; kement skoilh o tont a-dreuz d'an hent oa da vezañ korvoet hervez pleustr an daelerezh, eleze bezañ troet en un nerzh a-du petore durc'hadur bennak a ve dezhañ. An azon nemetañ degemeret gant LENIN evit barn an devoù broadel oa o ster e-keñver kerzh an dispac'h proleterel : hag elfennoù aesaus pe hualus e oant ? Mat eo pouezañ war ar poent-se, hiziv dreist-holl ma weler broadelourion ha rannvroelourion a bep liv oc'h embann arroudoù eus skridoù LENIN

da gadarnaat o lakadennoù. Mar gwelas en emsavioù broadel 'zo darbarourion eus an dispac'h, ne voe ket LENIN ur broadelour. Seul gent a se ne voe ket rannvroelour, hag un erez dibar en devoe ouzh an tezennoù rannvroelour.

Brastresañ a raimp emzalc'h LENIN e-keñver ar gudenn vroadel, en ur ober dave ar muiañ gwellañ d'e skridoù. E gwir, ur yezh fraezh ha berr e oa hini ar bleiniad bolchevik hag e destennoù n'o deus ket ezhomm da vezañ jubennet. Ur mestr direndael e voe war an dezrannañ hag an emzezrannañ, ha n'hor bo ket, evel m'hon eus ranket ober gant Otto BAUER, d'en em atersañ war ar peragoù eus ar savlec'hioù kemeret gantañ. LENIN a oar bepred ar perag eus ar pezh a ra ha peurliesañ e tispleg e-unan ar perag-se.

Mard eo ar vrogarouriezh ken kozh hag an Istor (1), n'eus nemet un nebeut kantvedoù m'o deus ar broadoù kemeret ur pouez bras en istor ar bed, - gant prantad kentañ ar gevalaouriezh (2). Liammet eo bet kresk ar Stadoù broadel gant kresk ar vourc'hizelezh e Kornog Europa. Ur roll araokadek ha dispac'hel he deus bet houmañ er c'heñver-se; lusket he deus ar Reverzhi c'hreantel ha drezi gorreadur disiwezh ar barroù-bevañ; diframmet he deus ar galloud politikel dicouzh ar vrientinon c'hladdalc'hour ha diazezet pennaennoù ar werinegezh; diorreet emouiziegezh mab-den dre erlec'hiañ ar poell ouzh an henvoaz (3). Echu eo avat prantad araokadek ar vourc'hizelezh, aet eo diganti he roll dispac'hel; ar gevalaouriezh ampleget gant ar Reverzhi c'hreantel he deus daspugnet an holl binvidigezh, ar madoù-kenderc'hañ, etre daouarn un niver bihan hag ar vourc'hizelezh zo aet d'ur renkad vac'hom o korvoñ ur yoc'h a vicherourion didra; ar vourc'hizion, piauget ganto ar galloud politikel e-kevret pe get gant ar pezh a chom eus ar renkadoù gladdalc'hour, a ra gantañ evit gwaskañ ar bobl e diabarzh ar Stadoù, hogen ouzhpenn-se int krog da ziazezañ ar reizhiad kevalaour dreist an harzoù e par an hollved : prantad an impalaerouriezh eo (4); kenderc'hel a reont da ziskleriañ pennaennoù gwerinek, met un touell n'eo ken ar re-mañ arveret ganto evit morzañ ar broleterion a gorvoont; ken furmek-all eo o mennadoù broadel : treitouriñ a reont o broad hag

o sevenadur p'o devez da zibab etrezo hag o lazioù renkadel (5). Echu eo roll arackadek ar 'vourc'hizelezh; ur renkad-ren nevez a rank bremañ kemer he lec'h : ar broleteriezh.

Dre an dispac'h e vo kaset an "dereadur galloud"-se. MARX a wele an dispac'h evel un dedroadur "naturel" eus ar reizhiad kevalaour : dislavaroù diabarzh houmañ o vont war lemmaat dre ma tiraeze prantad an impalaerouriezh, e ranke en em zistrujañ hec'h-unan ha disoc'hañ war ar sokialouriezh. LENIN, en ur zegemerout pennaenn an dedroadelezh varksour, a enebas groñs ouzh ar meizadurioù re "naturel" anezhi : ar broleterion a zle kacout ur roll oberiant e distruj ar gevalaouriezh hag e saveladur ar sokialouriezh, n'eo ket evel ur yoc'had nerzhoù armerzhel dall ha diemouez met evel ur renkad emouiziekaat ha frammet. Hogen e derou ar c'hantved e oant c'hoazh, e Rusia da nebeutañ, e stumm ur yoc'h diaoz ha dizesk. Anat e oa da LENIN ne c'hoarifent biken o roll dispac'hel diouto o-unan; lezet en o emdarzhegezh ned afent ket pelloc'h eget un difreterezh aner war-du amkanioù berrsell; ezhomm o doa, evit emouiziekaat, da vezañ stummet ha frammet en ur strollad dispac'hel kreizennet-strizh hag astennet d'an hollved (6). Abeget garv e voe seurt meizadur kreizennel, leviadel, eus an dispac'h gant un niver a izili eus ar Strollad Micherour Sokialdemokratel Rusiat : PLEXANOV, TROTSKY, hag eus ar Strollad Sokialdemokratel Alaman : Rosa LUXEMBURG (7). Pouezus eo e anaout evit meizañ ervat emzalc'hioù LENIN e meur a dachenn, e-keñver ar gudenn vroadel pergen.

Ahel an emgann proleterel zo an enebiezh etre ar broleterion hag ar re o gwask : renkad korvoer an Tsar, ar vrientinion, ar gevalaourion a oar ez eus ur brezel a vuhez pe a varv o ren etrezi hag ar broleterion. En-dro d'an ahel-se en em renk pep emgann all, kevredigezhel, armerzhel, broadel, sevenadurel. Ar blein eo an emgann proleterel a zle reiñ e ster, dispac'hel pe kilstourmel, da gement stourm o treiñ er bed. Ar penn-dave eo evit dezrannañ an devoudoù, an oberoù, ar c'hoantoù hag an arc'hadurioù. Mar goulenn ur bobl he dizalc'hted politikel e vo ensellet a) hag ur ster damkanel a-du gant an emgann proleterel en deus he goulenn b) hag ur splet embregel evit ar broleteriezh o stourm ez eus da harpañ he goulenn

E-keñver damkaniezh hollek n'eus kudenn ebet evit dezrannañ an emgann proleterel. Amkan ar broleterion eo dispenn ar reizhiad kevalaour, dibero'hennañ ha diveliañ ar renkad korvoer. Houmañ o vezañ frammet e par an hollved, e rank ar broleterion en em frammañ e par

an hollved ivez. Unan eus sevenadennoù ar vourc'hizelezh eo bet etrevroadelaat ar c'henderc'hañ; an dedroad araokaus-se he deus ar sokialouriezh da aspiaouañ, en ur erlec'hiañ avat un etrevroadelenn a vreudouriezh ouzh an etrevroadelenn a vac'homerezh diazezet gant ar gevalaourion. Anat eo da LENIN n'o deus ket ar broadoù ur roll bras da c'hoari ken. Ganto eo bet ar voull e-pad kantvedoù kentañ ar gevalaouriezh; hogen ar gevalaouriezh hec'h-unan zo o tiverkañ an harzoù etre ar broadoù he ganas hag o kendeuziñ o sevenadurioù : ar sokialouriezh a gaso da benn an hent boulc'het etrezek an etrevroadelaat (8) hag a gendeuzo holl broleterion ar bed en ur republiik proleterel hollvedel (9).

Mard eo fraezh an damkaniezh hollek ez eo kalz kempleshoc'h an traoù e tu an embregiezh. Dizehan en devoe LENIN d'ober ouzh harzderioù a-berzh ar renkadoù micherour o-unan. An harzder brasañ a voe, a bell, ar santad broadel, en em ziskouezas kalz kreñvoc'h eget gortozet, a reas d'an Eil Etrevroadelenn difloskañ, evel ma ouzer, e 1914. Seul grennoc'h a se e verkas LENIN an troc'h etre ar stourm proleterel ha pep stumm a vroadelouriezh, nemet e rankas anaout an devoud broadel evel ur gudenn wirion eus ar broleterion o-unan. Klokaat a reas an damkaniezh varksour hollek war dachenn arbennik ar vroadelezh, o spis-aat derez araokadegezh pep emsav broadel a-geñver gant derez emdroadur istorel ar vro ma stourm. Tri rumm a ra eus ar broadoù, hervez ma'z int degouezhet da vat en eil prantad, impalaerel, eus ar gevalaouriezh, hervez ma'z eus c'hoazh enno luskadoù broadel demokratel bourc'hiz, pe hervez m'emañ ar broioù-se o kuitaat hepken o oadvezh gladdalc'hel (10).

A-benn ar fin e kemer an devoud broadel ul lec'h hogos ken pouezus hag an devoud renkadel en dezrannadur a ra eus ar saviad kevredigezhel e Rusia. Peder elfenn a zeskriv er saviad-se. Goût a ouzer e c'hoarveze an Impalaeriezh rusian, evel an Unaniezh Soviedel, eus ur genel drec'h-el, Rusiz, hag eus tregont bennak a bobloù all arallgenel pe arallgravez, reoù 'zo warlerc'hiet-kenan (11).

Da elfenn gentañ e teskrive kraonell ar vro wasker, ar vourc'hizelezh kevalaour rusiat, kevredet gant ur renkad c'hladdalc'hel manet en

Integrat...

he sav hag o rannañ ganti ar galloud politikel, - ar graonell-se, o kendeuziñ mui-ouzh-mui gant ar gevalaouriezh etrevroadel zo penneneb-ourez ar broleteriezh hag an dispac'h. Diskleriañ a ra ur vroadelouriezh vac'hom, destrizhus ha dedeuzour, o waskañ digernez an tudadoù arallgenel annezet war zouar an Impalaeriezh. Daoust d'he doareoù mac'hom he deus ar vroadelouriezh-se ul levezon vras war ar bobl a-bezh, ken rusiat, ken arallgenel. Ha krisañ kerseenn buhez LENIN e voe hep mar gwelout ar broleterion hag an darn vrasañ eus o bleiniaded sokialdemokrat o treiñ kein d'an emgann proleterel evit en em deurel er brezel impalaerel.

Eil elfenn ar saviad rusian eo proleterion ar vro wasker, eleze ar vicherourion rusiat, a zo o niver o kreskiñ dre berzh greanteladur herrek ar riez, war un dro gant o emskiant a renkad hag o arc'hadurioù kevredigezhel. Anat eo e vo int keflusker an dispac'h.

An drede elfenn eo bourc'hizelezh ar broioù gwasket. He savlec'h zo dre vras an hevelep hini hag ar vourc'hizelezh rusiat. Koulskoude, he dasparzh etre bourc'hizelezh vras ha bourc'hizelezh vihan zo disheñvel, e gounid ar vourc'hizelezh vihan. Houmañ n'eo ket sanket ken don en argerzh impalaerel ha bevoc'h eo chomet enni ar santadoù gwerinek ha frankizour; he roll bourc'hizel a c'hoari oc'h enebiñ ouzh an diharzveli tsarel; ouzhpenn-se, er broioù gwasket e teu war hec'h eneberezh ul liv broadel : klask a ra difenn he yezh hag he sevenadur ouzh ar mac'homerezh sevenadurel rusiat. Met ent istorel ez eo liammet he zonkad ouzh hini ar vourc'hizelezh vras, ar vrientinon, ar gloer hag an tsarelezh : dirak arc'hadurioù ar broleterion en em renk raktal e tu ar wakerion (12).

Ar bevare elfenn a c'hoarvez eus proleteriezh ar broioù gwasket, gwiskad koueriadel hogos en e bezh, warlerc'hiet hag ar pellañ diouzh an emskiant a renkad, dalc'het e diaskren gant ar bobed hag ar berc'henned-douar, techet da vogañ droukrañs hep ober a zigemoù ouzh an tri rummad all a-vloc'h, ouzh proleterion ar vro wasker koulz hag ouzh ar vrientinon hag ar vourc'hizion (13).

Dav eo d'an dispac'herion kompren ervat o dleadoù. Kemplezh eo ar

re-mañ hervez ar renkad a zo dirazo. O dlead kentañ avat eo pellaat diouzh pep broadelouriezh evel diouzh ar gwashañ pistri o linkrañ unvaniezh etrevroadel ar vicherourion o stourm. A-fet ar vroadelouriezh vac'hom pleustret gant ar renkadoù-ren rusiat, ar C'hant-Du ha re Puriškevič (14), n'en deus ket LENIN kunujennoù a-walc'h evit he mill-igañ. En eneb, e-keñver brogarouriezh ar pobloù arallgenel e tiskouez arlivioù e-leizh en e alioù. Aspediñ a ra ar vicherourion rusiat da zibourc'hañ pep chaovinegezh ha d'en em ren gant ar vrasañ evezhiegezh ouzh ar poblañsoù a-vec'h deuet er-maez eus ar Grennamzer (15). Evit ar broioù trevadennel hag ar broioù suj warlerc'hiet er-maez eus Rusia, ez anzav ar roll araokadek o deus da c'hoari enno an emsavioù broadel demokratel bourc'hiz, hag e vrastres ar c'haderezh a zle ar strolladoù komunour kaout en o c'heñver : o skoazellañ, en ur virout strizh a gendeuziñ ganto, hag o diskar ur wech m'o devo sevenet o c'hefridi istorel a zispac'herion vourc'hizel (16). An diaesañ labour embregel en devoe LENIN da ren avat e voe en em zizober diouzh broadelouriezh ar vourc'hizion vihan.

Heklevioù eus ar stourmad-se hon eus bet p'hon eus studiet Otto BAUER. E gwir, eus ar renkad vihanvourc'hizel e teue hogos holl damkanourion an ober politikel, - LENIN e-unan a oa a orin bihanvourc'hizel. Mut e chome ar vicherourion hag ar gouerion, re wasket evit kemer perzh er vuhez kefredel; tost ken mut-all e chome ar renkadoù-ren, re sanket en ober evit prederiañ pell warnañ. Ar preder a veze al lod eus ar renkadoù-etre, dieub diouzh samm ar sklaverezh evel diouzh samm al levieriezh. Ar vihanvourc'hizion a zifenne uhelvennadoù ar frankiz, ar gevatalded, ar werinegezh; darn anezho, gounezet d'ar varksouriezh, a brezege an dispac'h kevredigezhel. An holl avat ne gasent ket, evel ma rae LENIN, o marksadegerzh betek ar gempoellded klok. Diegi o doa o vont betek penn hag oc'h aberzhiñ pep tra eus o c'healiadurezhioù kent. Klask a raent "klokaat" ur varksouriezh hantergoazhet dre lojañ enni tezennoù saveteet eus peñse o bed kozh, - hep damant da unvanded an hentenoù hag ar gelennadurezh. Ur skouer hon eus bet eus seurt kenaozadurioù digempoell gant strivoù Otto BAUER da

unaniñ sokialdemokratiezh·ha broadelouriezh.

Maksourion all, STALIN ha dreist-holl Rosa LUXEMBURG, a gave dezho e oa an arc'hadurioù broadel ur gudenn a eil renk da vezañ diskoulmet hervez rediezhoù ar gadouriezh renkadel, - pa oa echu ne vern penaos oadvezh ar broadoù, tonket ma oant holl da steuziañ gant donedigezh ar sokialouriezh hollvedel. Gwell o deus d'ober an dispac'herion eget plediñ gant mennadoù ar vourc'hizion vihan ha goubarzhelezhioù rannvroioù warlerc'hiet ar riezoù arnevez. Reizh diouzh ar gelennadurezh varksour e hañvale bezañ hevelep lakadennoù. Ha koulskoude, kontrol mik dezho e voe emzalc'h LENIN. Evitañ, ar gwir evit ar broadoù da emsavelañ zo ur gwir-diazez na oufe bezañ distaget diouzh korf ar frankizioù gwerinek. Ha termenañ a rae ar gwir da emsavelañ evel ar gwir da zisrannañ ha da amparañ Stadoù dizalc'h (17). Ouzhpenn-se, dlead proleterion ar vro wasker ne oa ket hepken anaout da reizh gwir ar broadoù gwasket da zisrannañ, met ivez reiñ dezho diouzh ret skoazell d'en em zieubiñ (18). Heuliomp mat mennoz LENIN ha diwallomp a welout en e dTezennoù war ar gudenn vroadel lakadennoù a-du gant nep broadelouriezh; en anv ar werinegezh hepken e felle dezhañ prezeg. A-du-rall e ouzer e kemeras perzh e Kendalc'h Brünne e 1899 hag e voe eno e-touez difennerion an "emrenerezh broadel", en ur geizañ e vennad o lavarout : "Ar gwir da zibriediñ n'eo ket ar redi da zibriediñ", - d'e soñj, 'ar sokialouriezh o lemel gwaskerezh ar broadoù a lamfe war un dro an abeg o doa ar broadoù da glask disrannañ. Ouzhpenn-se, ar broadoù a c'houlenne LENIN evito ar gwir da emsavelañ oa, dre dermenadur, broadoù graet gant ar renkad proleterel; da c'hortoz ma ve ar galloud enno etre daouarn ar broleteriezh, e tlee ar skoazell da reiñ d'o stourm broadel bezañ divizet gant ar sokialdemokratiezh e-ser he c'hadouriezh hollek (19).

Kemplezh oa enta kefridi ar broleterion. Seul ziaesoc'h e oa ma veze ar vourc'hizion vihan o tifenn int ivez gwir ar broadoù da gaout o frankiz, - e meur a dachenn e tifennont an hevelep pennaennoù, evit ur gwel, hag ar broleterion, met dre berzh o savlec'h istorek, ne c'hell o arc'hadurioù nemet bezañ utopek : diforc'h ebet ne reont etre

saviad broadel ur vro wasker ha hini ur vro wasket (20). An enebadur-diazez zo da zero'hel sonn er spered : tra ma'z eo arc'hadurioù an dispac'herion eztaol o gwerinegezh, ez eo arc'hadurioù ar vourc'hizion vihan eztaol o broadelouriezh hag o chaovinegezh; o tifenn ar frankiz vroadel, e touellont, e wanaont hag e tistrannont micherourion pep broad dre o stagañ ouzh "o" bourc'hizelezh hag o distagañ diouzh micherourion ar broioù all (21). Er c'heñver-se e teuas buan LENIN da verzout pegen noazus e oa tezennoù an "emrenerezh broadel" hag an "emrenerezh sevenadurel broadel" difennet gant ar sokialdemokrated aostrian, poloniat ha gant ar Bund yuzev eus Rusia. An emrenerezh ned eo nemet ur sujidigezh skañvaet; ret eo anzav e c'hell bezañ ur bazenn war-du an dieubidigezh klok, met neuz ur brient broadel zo gantañ, ha n'eus netra gwashoc'h eget seurt brientoù evit mirout ouzh ar proleteriezhoù a vroioù dish-eñvel da seveniñ o unvanadur etrevroadel. Ur gwariadur grevusoc'h c'hoazh zo anezhañ arc'hadur an emrenerezh broadel sevenadurel. Arc'hañ un emrenerezh sevenadurel zo klask kreñvaat al liammoù etre proleterion ha bourc'hizion an hevelep broad wasket ha disrannañ etrezo proleteriezhoù ar broioù suj dre ensaviñ amaezhierzhioù distag, skolioù distag evit pep tudad (22). Kempennelouriezh n'eo ket hevelep gwellaourioù goulennet e stern ar frammoù impalaerel. N'eus nemet arc'hadur ar gwir da zisrannañ, oc'h emplegañ distruj ar frammoù-se, a ve dispac'helour (23). Rak frankiz politikel ar vroad, pal ar vroadelourion, ned eo nemet ur bazenn, hag unan diret, war hent pal ar varksouriezh a zo kendeuzidigezh holl broleterion ar bed ha, da c'hortoz, holl broleterion an Impalaeriezh. Ne vo tizhet ar gendeuzidigezh-se nemet mar ren ar fiziañs klokañ etre proleterion ar vro wasker ha proleterion ar broioù gwasket, eleze mar ren ar werinegezh klokañ er frammoù dispac'hel, mar asant ar broleterion a c'houzañv ur gwaskerezh renkadel sammañ dreist o re arc'hadurioù ar broleterion a c'houzañv ur gwaskerezh broadel ouzhpenn ar gwaskerezh renkadel (24).

Meur a wech e pledas LENIN gant kudennoù dibarek ar sevenadur. Brogarouriezh a ziskouezas a-hed ar wech (25). Lorc'h a ziskoueze gant

yezh ha sevenadur e vro. Goulenn a c'haller petra oa ar sevenadur evitañ. Arabat klask en e oberoù un termenadur eus anien ar sevenadur, - an daelerezhour a vez o vuhezañ ar bed evel un hollenn war loc'h, ha diegi en devez oc'h ober ar pacuezioù goulennet gant an arvestiñ, pa oar he devo kemmet endeo an "anien" arvestet a-barzh fin an arvestadenn. Goude an dispac'h ez emellas aliezik e kammedoù kentañ an arz soviedel, gant kalz a zigoradur-spered hag a uvelded, evel ma tiskouez an hanezennoù danevellet gant e geneiled (26). Met aze n'emañ ket da gavout e brederioù donañ war ar sevenadur. O c'havout a reer e-barzh e skridoù emgann. Evit LENIN, ned eo nepred ar sevenadur ur voudelezh distag diouzh emgann-bevañ ar stolloù en gra. Keit ma chom abaf ha distourm ur bobl wasket, n'he deus sevenadur ebet; diwar ma tihun d'ar stourmdieubiñ e tihun war un dro d'an Istor ha d'ar sevenadur, - ha n'eo ket dre zegemerout ur sevenadur graet en a-raok met dre stagañ da grouiñ he sevenadur dezhi. Setu perak e ra bepred LENIN un enebadur groñs etre sevenadur broadel, frouezh an dispac'hioù bourc'hizel, bremañ o tispredañ, ha sevenadur etrevroadel, an hini a zo o tiwanañ diouzh stourm ar broleteriezh hollvedel (27); en hevelep selled, e pep sevenadur broadel e wele daou sevenadur broadel : hini ar waskerion, ha hini ar broleterion dispac'hour (28). Ent furmel avat, n'eus netra e sevenadur ar broleterion ha na ve bet en hini ar vourc'hizion araozo (20). Ar vourc'hizion eo o deus savelet pennaennoù ar frankiz, ar gevarzhelezh hag ar werinelezh a zo o ren bremañ war stourm ar broleterion. An diforc'h eo n'emañ ket mui ar vourc'hizion e tro da embreger ar pennaennoù-se, a zo utopiennoù evito pa zisklotont hiviziken gant o saviad istorel. En eneb, ar broleterion, hag i hepken, dre berzh o saviad a dud didra ha gwasket, a c'hell o embreger e pep gwirionded hag e pep gwerc'hegezh istorel. Dre-se, e vrastres LENIN ar sevenadur etrevroadel evel oc'h enderc'hel an elfennoù gwerinek a zo e pep sevenadur broadel (22).

Aes eo diwar se kompren pegen divastus e veze dezhañ tezennoù an "emrenerezh sevenadurel", - rak e gwirionez, ar "sevenadur" a oa e kaoz eno oa ar pezh a anvomp hiziv ar "sevenadur sevenet", eleze

frouezhioù an tremened; hag un enepster oa gwareziñ en un tu, ha pa ve e karter puraetañ ober mab-den, frouezhioù un tremened a stourmed da zispenn e pep karter all. LENIN n'en deus nepred donañ, pa ouzomp, meizad ar sevenadur evel m'en arvere, met anat eo diwar an arver a rae anezhañ ez enebe ar "sevenadur sevenet", hini Otto BAUER ha rannvroelourion ar mare, hag ar "sevenadur-seveniñ" a oa an ober dispac'hel end-eeun. Ha pa rankfed dilezel pep tra a-hend-all eus kelennadurezh LENIN, ar pezh n'eo ket diogel, pell diouzh eno, e vefe ur giladenn vras dianzav pennaem dispac'helezh ar sevenadur. O tont dre un hent all en deus an Emsav ivez savelet ar bennaenn-se.

Alies e voe rebechet da LENIN e greizennelouriezh. Ha kreizennelour e voe a dra sur. Dre ur redi a gadouriezh da gentañ penn : penaos trec'hiñ war etrevroadelenn ar vourc'hizion ma ne frammer ket ar broleterion en ur par etrevroadel ivez ? (29). Ne oa ket abegoù degouezhel hepken a zegase LENIN d'ar c'hlozadur-se : gentañ ned ae nepred ar gadouriezh hep ar boellouriezh istorek. Hervez emdroadur an Istor, edo prantad broadel an denelezh o lezel e lec'h gant ar prantad etrevroadel. Edo ar frammoù broadel o steuziañ e gounid ur framm etrevroadel. Hemañ a zle bezañ dre ret frouezh an dispac'h proleterel. Ha penaos aozañ ur framm na ve ket kreizennet ? Splann eo e tegase LENIN aze ur respont diouzh e ijin personel, met na oa ket empleget er varksouriezh. Uheloc'h hon eus meneget c'hoazh seurt leviadelouriezh; brav e oa d'an arbennerion hec'h enebañ ouzh dedroadelouriezh MARX. Kaer o devoe enebañ, - lenn a raimp tagadennoù rust Rosa LUXEMBURG (30), - ne ziroudas nepred LENIN diouzh e zure'hadur kentañ.

Un displegadur istorel a roer d'an anadenn-se, - ar c'hreizennerezh leninat na c'haller ket dispartiañ diouzh an diktaturiezh stalinat en kasas d'e benn pellañ, hervez damkanourion 'zo he deus "an diktaturiezh daou roll en tremen eus an urzh kozh d'an urzh nevez : ur roll dispac'hel hag ur roll kilstourmel. () Diktaturiezh ar broleterion a ziskaras perc'hentiezh prevez ar c'hevala, hogen o vont e stamm unveliezh ar Strollad Komunour ha zoken unpenniezh STALIN, e reas an diktaturiezh-se un distro war-du impalaeriezh an Tsar" (31).

Gant an
 En amzaeladur hollek a raimp eus ar gudenn vroadel e kendezrannimp kelennadurezh LENIN ha hini an Emsav. Gwelout a raimp penaos an dispac'h-erion a hiziv, en Trede Bed pe e Breizh, ne welont ket ken ar vroadelezh gant daoulagad ar volcheviked. An Emsav dreist-noll, mar diazez e gelennadurezh en un daelerezh istorek a zo dleourez vras d'an daelerezh marksour, ne enkloz ket ken an daelerezh-se e bevennoù an armerzhelezh, ne strisha ket ar c'henderc'hañ d'ar c'henderc'hañ armerzhel.

Istor end-eeun an dispac'h soviedel en deus barnet kelennadurezh LENIN a-zivout ar vroadelezh. Mard eo dispredet hiziv lod eus ar pennaennoù a zederveze d'an devoud broadel, ez anavezomp ennañ un diaraoger war hent hon dispac'h hag ur skouer a-fet onestiz dispac'hel. Lavaret hon eus ned ae nepred gant LENIN ar gadouriezh hep ar boellouriezh. Lavarout a reomp ouzhpenn ned ae nepred gantañ ivez ar boellouriezh hep an divezouriezh dispac'hel. Azasaat a rae atav e jedadurioù kaderezhel ouzh ar ster ergereel a roe d'an dispac'h : trec'h ar broleterion war o gwaskerion; ha reizhet en deus bepred ar ster a roe d'an dispac'h diouzh an dremm a roe d'ar wirionez : kevarzhelezh.

-
- (1) "Ar vrogarantez zo unan eus ar santadoù donañ, kensakret gant ar c'hantvedoù hag ar milvedoù e pep mammvro" LENIN, Pravda 252, 21 du 1918.
- (2) "Evit a sell ouzh ar gudenn vroadel e tremen diorreadur ar gevalaouriezh dre zaou duadur istorel. Anadiñ a ra an hini kentañ en dihun d'ar vuhez vroadel ha d'an emsavioù broadel, e krouidigezh ar Stadoù broadel. Anadiñ a ra an eil e diorreadur hag e liesadur an darempredoù a bep seurt etre ar broadoù, e distruj ar c'haelioù broadel, e krouidigezh unded etrevroadel ar c'hev-ala, an armerzh dre vras, ar politikerezh, ar ouezoniezh, h.a..
 "An daou duadur-se zo anezho savelenn hollek ar gevalaouriezh. Ren a ra an hini kentañ e derou hec'h emdroadur, azon eo an eil eus ar gevalaouriezh o tareviñ hag o vont war dreiñ en ur gevredigezh sokialour." LENIN, Prosveščenie 12, kerzu 1913.
- (3) "Ar brezelioù broadel gwirion, ar re c'hoarvezet er prantad 1769-1871 pergen, a oa un eztaol eus luskadoù broadel yoc'hek, eus ur stourm ouzh an diharzveli hag ar reizhiad c'hladdalc'hel, evit lemel ar gwaskerezh broadel ha krouiñ Stadoù diazezet war

ar broadoù, amplegad ret da ziorreadur ar gevalaouriezh." LENIN, Social'demokrat" 40, 29 meurzh 1915.

(4) "Un dra ret eo unaniñ micherourion an holl vroioù dre an arbenn ma n'eo ket bevnet en ur vro hepken renkad ar gevalaourion a wask ar vicherourion. Kreskiñ ha paoaat a ra an darempredoù kenwerzhel etre ar riezoù; tremen a ra ar c'hevala eus ur vro d'eben. Ar bankoù, o tolpañ kevalaoù ramzel dastumet e pep lec'h ha dasparzhet ganto etre ar gevalaourion e stumm prestoù, a baouez a vezañ broadel evit dont da vezañ etrevroadel; daspugn a reont kevalaoù o tont eus an holl vroioù hag o dasparzhañ etre kevalaourion Europa hag Amerika. Kevredadoù dirveur dre gevrannoù a vez amparet a-benn diazezañ embr-egerezhioù kevalaour n'eo ket mui en ur vro hepken, met e lies bro war un dro; kevredadoù kevalaour etrevroadel a weler o tiwanañ. Mestroniezh ar c'hevala zo etrevroadel. E-se, ne c'hell stourm micherourion an holl vroioù evit o frankizadur dont da bennvat eñ ivez nemet mar ren ar vicherourion o emgann a-gevret ouzh ar c'hevala etrevroadel. Setu perak, en e stourm ouzh renkad ar gevalaourion, en deus ar micherour rusian da geneiled ar micherour alaman, ar micherour poloniat hag ar micherour gall, evel m'en deus da enebourion ar gevalaourion rusiat, poloniat ha gall." LENIN, skrivet en tuoll-bac'h e mezheven-gouere 1896, emb. Proletarskaja Revoljucia 3, 1924.

(5) "Ar Strollad Sokialour Poloniat a wel an traoù evel pa vije diluziet ar gudenn vroadel ur wech displeget dre an enebadur-mañ : "ni" (Poloniz), hag "int" (an Alamaned, ar Rusianed, h.a.). Ar Sokialdemokratad, evito, a laka er renk kentañ an enebadur-mañ : "ni" ar broleterion, hag "int" ar vourc'hizion. "Ni", ar broleterion, hon eus gwelet dek ha dek gwech penaos e treitour ar vourc'hizelezh lazioù ar frankiz, ar vammvro, ar yezh hag ar vroad, kerkent ma sav ar broleteriezh dirazi. Gwelet hon eus penaos ar vourc'hizelezh c'hall, en ampoent ma oa ar vroad c'hall en he brasañ izeladur hag en he brasañ sklavadur, he deus en em roet d'ar Brusianed, penaos en deus Gouarnamant an difennerezh broadel en em dreuzfurmet e Gouarnamant an trubarderezh broadel, penaos he deus bourc'hizelezh ur vroad wasket galvet war he skoazell soudarded ar vroad wasker evit flastrañ he c'henvroiz proleterion a oa bet her a-walc'h da gas o dorn war-du ar galloud." LENIN, Ar gudenn vroadel en hon raklun, Iskra 44, 15 gouere 1903.

(6) LENIN, Petra ober ? 1902.

(7) En e levr Petra ober ?, en doa LENIN skrivet : "Ne c'hell bezañ a emsav dispac'hel start hep ur framm a levrierion stabil o tiogeliñ dalc'helezh al labour. Seul niverusoc'h ma'z eo ar yoc'h o tont ent emdarzhiek d'an emgann, oc'h amparañ diaz an emsav hag o kemer perzh ennañ, ha seul retoc'h eo un hevelep framm, seul startoc'h e rank bezañ (anez da se e ve aesoc'h da forzh pe lorber hoalañ gwiskadoù

warlerc'hietañ ar yoc'h). Ar framm-se a zle bezañ graet gant tud o kaout an ober dispac'hel da vicher."

PLEXANOV a abegas : "Goude skarzhañ ar sokialouriezh diouzh ar yoc'h hag ar yoc'h diouzh ar sokialouriezh, en deus LENIN savet an intellingentsia sokialour da renk an Demiourgos eus an dispac'h sokialour, hag eñ gant e ziskibion sentus da renk an intelligentsia sokialour a gentañ klas pe, koulz lavaret, an dreistintelligentsia.

() "Ar pleustr a ziskouezas din e veize LENIN ar yoc'h evel un "elfenn anistorel" eus an Istor, evel un "Danvez" lusket war-du ar sokialouriezh dre ur "Spered" o werediñ eus an diavaez." Iskra 70, 25 gouere 1904.

Ha TROTSKY : "An armerzhelourion ne vleniont ket ar broleteriezh peogwir en em stlejont war he lerc'h, met ar bolitikelourion ne vleniont ket ar broleteriezh peogwir e sammont o-unan he c'hefridioù. An armerzhelourion o deus diflipet dirak al labour ramzel a oa d'ober peogwir e veizent o roll evel re zister : bale e lost an Istor, met ar bolitikelourion a ziskoulm ar gudenn o klask ober o lost eus an Istor. ()

"E politikerezh diabarzh ar Strollad, seurt hentennoù a gas framm ar Strollad da gemer lec'h ar Strollad, ar Poellgor-kreiz da gemer lec'h framm ar Strollad hag a-benn ar fin un diktatour a gemer lec'h ar Poellgor-kreiz." Hon c'hefridioù politikel 1904.

Ha Rosa LUXEMBURG : "Hañvalout a ra dimp e ve ur fazi grevus krediñ e c'hallfed "da c'hortoz" lakaat an diharzveli eus un aozadur-kreiz galloudeget e-lec'h ar vestroniezh, disevenadus c'hoazh, war o strollad eus muianiver ar vicherourion emouiziek, hag e-lec'h ar reolerezh foran gant ar yoc'hoù micherour war organoù ar Strollad, lakaat ar reolerezh a-c'hin gant ar Poellgor-kreiz war obererezh ar broleteriezh dispac'hel.

"O reiñ da organ-leviañ ar Strollad galloudoù ken diharz ha nac'h-el, evel ma fell da LENIN ober, ne reer nemet kreñvaat betek un derez dañjerus-tre mirelouriezh naturel endeo hag enstag an organ-se." Iskra 69, 10 gouere 1904.

- (8) "Buhez a-bezh, armerzhel, politikel, kefredel an denelezh a vez oc'h etrevroadelaat bepred muioc'h, zoken dindan ar renadoù kevalour. Peuretrevroadelaet e vo gant ar sokialouriezh." LENIN 1913, emb. Teskad Lenin III 1925.
- (9) "Enebourion omp d'ar c'hasonioù broadel, d'an dizemglevioù broadel, d'ar c'houbarzhegezh vroadel. Etrevroadelourion omp. Da bal e kemeromp unanadur strizh ha kendeuzadur klok micherourion ha kouerion holl vroadoù ar bed en ur Republik soviedel hollvedel unel." LENIN, Lizher da vicherourion ha da gouerion Ukraina da geñver an trec'hioù gounezet war Denikin, Pravda 3, 4 genver 1920.
- (10) "Tri fatrom broioù e-keñver gwir ar broadoù da emsavelañ.
"Da gentañ, broioù kevalour araokaet Korneg Europa hag ar Stadoù-Unanet. Enno ez eo echu pell 'zo an emsavioù broadel araokadour

bourc'hiz. Pep hini eus ar broadoù "bras"-se a wask broadoù all en trevadenoù hag e diabarzh he harzoù. Kefridioù proleterion ar broadoù mestronier zo dres re proleterion Bro-Saoz en 19t kantved e-keñver Iwerzhon [sl. (29)].

"D'an eil, Reter Europa : Aostria, ar Balkanoù ha dreist-holl Rusia. En 20t kantvet peurgetket e tiwanas eno an emsavioù broadel demokratel bourc'hiz hag ez eas taer ar stourm broadel. Er broioù-se, ar broleterion, ken evit kas da benn an treuzfurmatur demokratel bourc'hiz, ken evit harpañ an dispac'h sokialour er broioù all, ne sevenint o c'hefridi nemet mar difennont gwir ar broadoù da emsavelañ. Diaes-kenan ha pouezus-kenan eo ar gefridi kendeuziñ stourmoù renkadel micherourion ar broadoù gwasker hag ar broadoù gwasket.

"D'an trede, ar broioù damdrevadennel evel Sina, Persia, Turkia hag an holl drevadennoù o vodañ etrezo ur mil milion a annezidi. Eno, an emsavioù demokratel bourc'hiz pe zo o paouez deraouiñ, pe zo pell c'hoazh diouzh o zermen. Dlead ar sokialourion n'eo ket hepken arc'hañ an dieubidigezh raktal, hep diviz ha hep daspren, eus an trevadenoù (hag an dieubidigezh-se, en hec'h eztaol politikel, ned eo netra estreget gwir ar broadoù da emsavelañ); dlead ar sokialourion eo harpañ en doare taerañ an elfenoù dispac'husañ eus an emsavioù demokratel bourc'hiz a zieubidigezh vroadel er broioù-se, hag o skoazellañ da zarsaviñ (pe, hervez an dro, da ren o brezel dispac'hel) enep ar riezoù impalaerour a zo ouzh o gwaskañ."

LENIN, An dispac'h sokialour ha gwir ar broadoù da emsavelañ, Vorbote 2, ebrél 1916.

(11) Rusiat ha rusian a eneber en doare-mañ : rusiat a ra dave d'an dudad, rusian d'ar riez; sk.: En Impalaeriezh rusian edo ar broadoù rusiat, ukrainat, ur vroadenn boloniat, h.a..

(12) "E Rusia, an enepdispac'h zo divarrek da gas da benn ar c'hefridioù istorel a zo re an dispac'h. Mui-ouzh-mui e vez dedennet ar vourc'hizelezh rusian etrezek ar froud etrevroadel enepproleterel hag enepgwerinek, hag ar broleteriezh rusian ne zle ket fiziout war he c'hevredidi frankizour. He hent dezhi, dizalc'h, a rank heuliañ war-du trec'h klok an dispac'h." LENIN, Danvezioù tanidik ar politikerezh hollvedel, Proletarij 33, 23 gouere 1908.

"Arabat d'ar sokialdemokratiezh ankouaat e vez alies ar c'hourf-erc'henned, ar bobed ha bourc'hizelezh ar broadoù gwasket o c'holeiñ gant gerioù-stur broadelour ar c'hoant o deus da zisrannañ ar vicherourion ha d'o zouellañ, en ur skoulmañ e kuzh dezho marc'hadoù gant gourferc'henned ha bourc'hizelezh ar vroad vestronier diwar-goust yoc'hoù labourer an holl vroadoù." LENIN, Alioù ha ratozhiadoù Kendalc'h Poellgor-kreiz Strollad Micherour Sokialdemokratel Rusia, 1913.

"Ar sokialdemokratiezh a rank gant ar brasañ nerzh lakaat war evezh proleteriezh ha renkadour labourer an holl vroadelezhioù ouzh ar

gerioù-stur broadelour arveret gant "o" bourc'hizelezh evit o zouell-
añ : gant he frezegenoù c'hwek pe feuls war ar "vammvro", e striv
da zistrannañ ar broleterion ha da bellaat o selloù diouzh hec'h
amrealoù dezhi, ar vourc'hizelezh, ha diouzh ar c'hevredadur polit-
ikel hag armerzhel he liamm ouzh bourc'hizelezh ar broadoù all hag
an unpenniezh tsarel." LENIN, Tezennoù war ar gudenn vroadel 1913,
emb. Teskad Lenin III 1925.

- (13) "Gwaskerezh kantvedel ar riezoù impalaerour war ar pobloù trevad-
ennel ha gwan en deus lezet e yoc'hoù labourer ar re-mañ n'eo ket
hepken kasoni, met ivez disfiz ouzh ar broadoù gwasker dre vras,
koulz hag ouzh proleteriezh ar broadoù gwasker. Trubarderezh mezhus
ar sokialouriezh gant an darnvuiañ eus pennoù kefridiel ar brolet-
eriezh e 1914-1919, pa zifenne ar sokialchaovineion, war zigarez
difenn ar "vammvro", "gwir""o" bourc'hizelezh da vachomañ an trev-
adennoù ha da breizhañ ar broioù a oa en he dalc'h kellidel, ne
c'halle nemet gwashaat an disfiz kantreizh-se. Diouzh un tu all, *justpa*
seul warlerc'hietoc'h ma'z eo ur vro, seul c'halloudekoc'h ez eo
enni ar gounezerezh bihan, ar mod-bevañ ozhac'hmeurel hag an dienez
spered, ar pezh a ro hep mank un nerzh-herzel bras d'an treuzvarnioù
engere-hog bihanvourc'hizel sanketañ, eleze re an emgarantez vroadel, ar strizh-
ded vroadel. O vezañ ma ne c'hallo an treuzvarnioù-se steuziañ nemet
goude ma vo steuziet an impalaerouriezh hag ar gevalouriezh er
broioù araokaet, ha goude ma vo bet treuzfurmet penn-da-benn diaz
armerzhel a-bezh ar broioù warlerc'hiet, ne c'hallo an treuzvarnioù-
se nemet kouezhañ gorrek-kenan. Alese ar redi m'emañ proleteriezh
komunour emouiziek an holl vroioù da ziskouez ur boellegezh hag un
evezhiegezh dibar e-keñver aspadennoù ar santad broadel er broioù
hag er pobloù gwasket a bell 'zo, hag ivez an dlead d'ober goulez-
adoù a-benn hastañ steuzidigezh an disfiz hag an treuzvarnioù-se."
J LENIN, Divrazadur kentañ an tezennoù war ar c'hudennoù broadel
ha trevadennel (Evit Eil Kendalc'h an Etrevroadelenn Komunour)
Etrevroadelenn Komunour 11, 14 gouere 1920. *Comunour*

- (14) Ar C'hant-Du oa un aozadur spontelour e dalc'h ar polis tsarel o
stourm ouzh an emsav dispac'hel, o trouklazhañ an dispac'herion,
o tagañ ar gefredourion araokadour, o sevel pogromoù. Un ezel Kant-
-Du, V.M.PURIŠKEVIČ (1870-1920), gourferc'henn douar, a veze kemeret
da ardamez an impalaerouriezh rusian hag ar vroadelouriezh vac'hom.
- (15) "Skrivet em eus c'hoazh em oberoù a-zivout ar gudenn vroadel ez eo
aner a-grenn stigmañ en difetis kudenn ar vroadelouriezh dre vras.
Ret eo ober an diforc'h etre broadelouriezh ar vroad wasker ha hini
ar vroad wasket, etre broadelouriezh ur vroad vras ha broadelouriezh
ur vroad vihan.
"E-keñver an eil broadelouriezh, ni broiz ur vroad vras en em laka
hogos bepred kablus, a-hed an istorvezh, a feulsterioù diniver, ha
gwashoc'h c'hoazh, e reomp direizhderioù ha preizherezhioù diniver
hep merzout dimp. Ne'm eus nemet kounañ va eñvorennoù eus ar Volga

war an doare ma vez graet ganimp ouzh an arallgeneliz : ar Poloniad, an Tatar, an Ukrainad, ar Georgiad hag arallgeneliz all eus ar C'haokaz ne glevont nemet goapanvioù disprizus evel "Poljačiška", "Kniaz", "Xoxol", "Kapkazski čelovek".

"E-se, an etrevroadelouriezh a-berzh ar vroad wasker pe ar vroad graetanvet "bras" (goude ma'z eo bras hepken dre he mac'homerezh, bras hepken evel ma'z eo da skouer ar gward-galeoù) a zle c'hoarvezout n'eo ket hepken eus an doujañs da gevatalded furmel ar broadoù, met ivez eus un digevatalded o kempouezañ a-berzh ar vroad wasker an digevatalded an devoudoù. An hini n'en deus ket komprenet se n'en deus ket komprenet kennebeut ar pezh ez eo an emzalc'h proleterel gwirion e-keñver ar gudenn vroadel : hennezh a chom, e gwirionez, gant ar savboent bihanvourc'hizel ha, da heul, ne c'hell nemet risklañ e pep kammed war-du savlec'hioù ar vourc'hizelezh."

Kudenn ar broadelezhioù pe an "emrenerezh", notennoù berrskrivet d'an 31 kerzu 1922, emb. Kommunist 9; 1956.

- (16) "Er riezoù kevalaour endeo en o fezh ma'z eus strolladoù micherour oc'h ober ent werc'hel rakward ar broleteriezh, kentañ ha pouezusañ labour eo stourm ouzh gwariadur koulzataer, bihanvourc'hizel ha peoc'helour ar c'heal hag ar politikerezh etrevroadelour.

"Evit ar riezoù hag ar broadoù warlerc'hietoc'h, ma'z eo trec'h ar c'heñverioù a zoare gladdalc'hel, ozhac'hmeurel pe ozhac'hmeurel-koueriadel, e ranker derc'hel fraezh war ar spered :

"1° Ar ret evit an holl strolladoù komunour skoazellañ an emsavioù-dieubiñ demokratel bourc'hiz er broioù-se, ha da gentañ, ez eo kefridi redivius micherourion ar riez a zalc'h ar vroad warlerc'hiet er sujidigezh trevadennel ha kellidel reiñ ar skoazell oberiantañ;

"() 5° Ar ret groñs stourm ouzh an tuadur da wiskañ livioù ar gomunouriezh war luskadoù-dieubiñ demokratel bourc'hiz ar broioù warlerc'hiet; ne zle an Etrevroadelenn Gomunour skoazellañ emsavioù broadel demokratel bourc'hiz an trevadennoù hag ar broioù warlerc'hiet nemet war an diviz ma ve kentelfennoù ar strolladoù proleterel da zont en holl vroioù warlerc'hiet strollet ha diorreet ^{er} spered ^{hant} eus o c'hefridioù dibarek, kefridioù a stourm ouzh an emsavioù demokratel bourc'hiz eus o broadoù, an Etrevroadelenn Gomunour a zle skoulmañ emglevioù prantadel gant demokrated vourc'hiz an trevadennoù hag ar broioù warlerc'hiet, hogen na gendeuziñ ganto, ha mirout dizalc'h rik an emsav proleterel, zoken en e furm eginekañ."

LENIN, Divrazadur kentañ..., sl. (13).

- (17) "Evit a sell ouzh gwir ar broadoù gwasket gant an unpenniezh tsarel da emsavelañ, da lavarout eo da zisrannañ ha da amparañ ur Stad diforc'h, e tle ar strollad sokialdemokratel difenn groñs ar gwir-se. Henn goulenn a ra pennaennoù-diazez an demokratiezh etrevroadel dre vras, koulz hag ar mac'homerezh broadel dreistkred embreget war brasniver poblañs Rusia gant an unpenniezh tsarel, houmañ o vezañ ar reizhiad stadel kilstourmusañ ha krisañ mar he c'heñverier gant hini ar Stadoù amezek eus Europa pe Azia. Henn goulenn a ra ivez

an emgann evit frankiz poblañs Rusia, divarrek da grouiñ ur Stad werinek ma ne vez ket diframmet ar vroadelouriezh rusian kant-du, harpet ma'z eo gant henvoaz ar moustradurioù gwadek niverus o deus skoet an emsavioù broadel ha dalc'het ma'z eo ent reizhiadek n'eo ket hepken gant an unpenniezh tsarel hag an holl strolladoù kil-stourmer, met ivez gant ar frankizouriezh bourc'hizel rusiat a vez o ruzañ a-dreuz-kof dirak an unpenniezh, er prantadoù enepdispac'h-el pergen." LENIN, Alioù ha ratozhiadoù..., sl. (12).

- (18) "Proleteriezh ar broadoù gwasker ne c'hell ket kavout he gwalc'h gant frazennoù hollek, bloc'heiladek, ranezennet gant an holl vourc'hizion beoc'helour, a-enep d'an destagadurioù hag a-du gant kevatalded gwirioù ar broadoù dre vras. Ne c'hell ket tevel war ar gudenn, "diblijus" mar bez evit ar vourc'hizion impalaerour, eus an harzoù riezal diazezet war waskerezh ar broadoù. Ne c'hell ket chom hep stourm ouzh an dalc'hidigezh dre an nerzh eus ar broadoù gwasket e diabarzh harzoù ar riezoù-se; e gerioù all, e rank stourm evit ar gwir da emsavelañ. E rank arc'hañ frankiz an disrannañ politikel evit an trevadennoù hag ar broioù sujet gant "he" broad. Anez da se, etrevroadelouriezh ar broleterion a chom hep ster ha geriek; ne c'hell bezañ na kenfiziañs, na kengred renkadel etre micherourion ar vroad wasket ha re ar vroad wasker; ha ne vez ket diguzhet kluf-anerezh difennourion kempennelour ha kaotskiour an emsavelañ, na rannont grik diwar-benn ar broadoù gwasket gant "o" broad ha dalc'h-et enni dre an nerzh." LENIN, An dispac'h sokialour..., sl. (10).
- (19) "Kudenn gwir ar broadoù da emsavelañ (eleze ar gwarant roet gant Bonreizh ar Stad evit ur mod diskoulmañ dieub ha gwerinek rik eus kudenn an disrannañ) ne zle ket bezañ treuzkemeret evit ar gudenn da c'houzout hag e tere ouzh ar vroad-mañ-broad disrannañ. Ar gudenn-mañ diwezhañ a zle bezañ diskoulmet gant ar strollad sokialdemokratel e pep degouezh dibarek en un doare emren rik, diouzh savboent lazioù an diorreadur kevredigezhel en e bezh ha lazioù stourm renkadel ar broleterion evit ar sokialouriezh." LENIN, Alioù ha ratozhiadoù..., sl. (12,17).
- (20) "N'eo ket hepken arc'hadur gwir ar broadoù da emsavelañ, met holl boentoù hon raklun izek demokratel a voe gwechall, ken abred hag ar 17t hag an 18t kantved, displeget gant ar vourc'hizelezh vihan. Hag ar vourc'hizelezh vihan a gendalc'h d'o displegañ holl en un doare utopek, hep gwelout stourm ar renkadoù hag ar grevusadur anezhañ en oadvezh an demokratiezh, en ur grediñ er gevalaouriezh "peoc'hiek". Setu dres utopienn un unaniezh peoc'hiek a vroadoù kevatal o gwirioù en oadvezh an impalaerouriezh, utopienn o touellañ ar bobl hag erbedet gant dalc'hidi KAUTSKY. En eneb d'an utopienn-se vihanvourc'hizel ha koulzataer, e tle raklun ar sokialdemokratiezh lakaat er renk kentañ, evel un devoud diazez, pennañ ha diziouerüs en oadvezh an impalaerouriezh, rannadur ar broadoù e broadoù gwasker ha broadoù gwasket." LENIN, An dispac'h sokialour..., sl. (10,18).

(21) "E Rusia, goude 1905 pergen, p'o deus ar speredekañ eus ar vourc'h-izion gwelet splann pegen divastus e oa an nerzh kriz drezañ e-unan, a bep seurt strolladoù ha luskadoù bourc'hiz "araogelour" o deus arveret alies-ouzh-alies an dro-argerzh a zo anezhi disrannañ ar vicherourion dre skignañ mennozioù ha kelennadurezhioù bourc'hizel a wanae stourm ar renkad vicherour.

"E renk ar mennozioù-se, ez eus ur vroadelouriezh puraet, o prezeg an disrann hag ar bruzhunerezh eus ar broleteriezh war zigarezioù burlutusañ ha filimusañ; da skouer, war zigarez difenn lazioù ar "sevenadur broadel", an "emrenerezh" pe an "dizalc'hiezh vroadel", h.a., h.a..

"Ar vicherourion emouiziek a striv da zisteurel pep broadelouriezh, kenkoulz ar vroadelouriezh gros ha feuls giz ar C'hant-Du hag ar vroadelouriezh puraetañ, an hini a brezeg a-du gant kevatalded wirioù ar broadoù war un dro gant difloskadur ar c'hamp micherour, ar frammoù micherour, an emsav micherour, dre vroadelezhioù. O lakaat da dalvezout ar ratozhiadoù darbennet gant kuzuliadeg diwezhañ ar varksourion (hañv 1913), e tifennont, - en eneb da holl wiskadoù ar vourc'hizelezh vroadelour, - n'eo ket hepken ar gevatalded wirioù klokañ, kempoellañ, ur gevatalded kaset betek penn evit ar broadoù hag ar yezhoù, met ivez ar c'hendeuzadur eus yoc'hoù micherour pep broadelezh e-barzh frammoù proleterel unel.

"Aze emañ an diforc'h groñs etre raklun broadel ar varksouriezh ha hini n'eus forzh petore bourc'hizelezh, ha pa ve an "araokaetañ"."

LENIN, Breinadur ar vicherourion dre ur vroadelouriezh puraet, Put' Pravdy 82, 10 mae 1914.

(22) "Ar sokialourion a stourm ouzh an diskouezadurioù a bep seurt, gros pe soutil, eus ar vroadelouriezh vourc'hizel. Unan eus an diskouezadurioù-se eo end-eeun ger-stur an "emrenerezh broadel sevenadurel" oc'h unaniñ proleteriezh ha bourc'hizelezh an hevelep broad, hag o tistrannañ proleteriezh ar broadoù disheñvel.

"Ar sokialdemokrated o deus bepred kensentet hag a gensent ouzh savboent an etrevroadelouriezh. Pa fell dimp gwareziñ kevatalded wirioù an holl vroadelezhioù enep ar c'hladalc'hourion hag ar Stad poliser, ez erbedomp, n'eo ket ur "sevenadur broadel", met ur sevenadur etrevroadel, ma kemer pep sevenadur broadel perzh ennañ evit un darn hepken, eleze dre ar pezh a werinek kempoell hag a sokialour a zo enni." LENIN, Raktres kensavenn evit I Ve Kendalc'h eus Sokialdemokratiezh Tiriad Latvia, emb. e latviég war ar gazetenn Činas Biedrs 4, eost 1913.

"En arbenn eus an tennder dibar a zo aet gant kudenn an emrenerezh broadel sevenadurel e-touez ar sokialdemokrated, setu un nebeut sklaeriadurioù war an dezenn-se.

"a) Diouzh savboent ar sokialdemokratiezh, ez eo dizegemeradus teurel, ent eeun pe ameeun, ger-stur ar sevenadur broadel. Faziiek eo ar ger-stur-se, pa vez buhez a-bezh, armerzhel, politikel, kefredel an denelezh oc'h etrevroadelaat bepred muioc'h, zoken dindan ar renadoù kevalaour. Feuretrevroadelaet e vo gant ar sokialouriezh. Ar

sevenadur etrevroadel krouet ken abred ha hiziv ent reizhiadek gant proleterion an holl vroioù ne asperc'henn ket pep tra eus ur "sevenadur broadel" (forzh pehini e ve ar vroad), met kemer a ra digant pep sevenadur broadel an elfennoù gwerinek ha sokialour kempoell a zo ennañ.

"b) N'eus e raklunioù ar sokialdemokratiezh moarvat nemet ur skouer o tostaat, abaf gwir eo, da c'her-stur ar sevenadur broadel : ar rannbennad 3 eus raklun Brünn gant sokialdemokrated Aostria, pa lavar : "An holl rannvroioù eus un hevelep broad dezho galloudoù amaezhel embiaou a ampar un unvez vroadel o verañ he greadoù broadel e pep emrended".

"Ur ger-stur a dreuzvarc'had eo, rak n'eus ket aze un eskenn a emrenerezh broadel eztiriadel (personel). Koulskoude, faziiek ha noazus eo ar ger-stur-se ivez, rak ned eo tamm ebet an emell eus sokialdemokrated Rusia unaniñ en ur vroad Alamaned Lodz, Riga, Petersburg ha Saratov. Hon emell eo stourm evit an demokratiezh klok ha lamadur an holl vrientoù broadel, evit ma unanfe micherourion alaman Rusia gant micherourion an holl vroadoù all a-benn diwall ha diorren sevenadur etrevroadel ar sokialouriezh.

"Seul gent a se ez eo faziiek ger-stur an emrenerezh broadel eztiriadel (personel), oc'h emplegan (hervez raktres dalc'hidi gempoell ar ger-stur-se) saveladur daloù broadel ha sekretourion-Stad broadel (O.BAUER ha K.RENNER). Pa'z int kontrol da amplegadoù armerzhel ar broioù kevalaour, pa n'int bet arnodet e bro gwerinek ebet, seurt ensavadurioù zo anezho ur rambreadenn goulzataer a-berzh ar re o deus kollet pep spi ma ve krouet un deiz ensavadurioù gwerinek kempoell hag a zo o klask un disentez da arvelloù broadel ar vourc'hizion e-barzh ur c'houbarzhegezh danzeel oc'h unaniñ proleterion ha bourc'hizion eus pep broad war gudennoù 'zo (ar c'hudennoù "sevenadurel"). ()

"d) () Ar gerioù-stur a spered gwerinek kempoell a gas da gendeuziñ ar broleteriezh hag an demokratiezh araokaet e pep broad (ar gwiskadoù-se n'o deus ket ezhomm ez afe elfennoù gwerinek ar broadoù war zibarekaat, met war unvaniñ en holl dachennoù, tachenn ar skol pergen), tra ma'z eo ger-stur an emrenerezh broadel sevenadurel un hadenn a zisranniezh e-touez proleterion ar broadoù diseurt, dre o stagañ ouzh an elfennoù kilstourmer ha bourc'hizel eus pep broad.

"Ar gerioù-stur a spered gwerinek kempoell a gav skoilh gant eneberezh diblegus ar gilstourmerion hag ar vourc'hizelezh enepdispac'hour eus pep broad, tra ma vez ger-stur an emrenerezh broadel sevenadurel kavet degemeradus-kenan gant kilstourmerion ha bourc'hizion enepdispac'hour broadoù 'zo." LENIN, Tezennoù..., sl. (12).

- (23) "Ar sokialdemokrated poloniat a gav dezho ez eo hon raklun "broadelkempennelour". Keñveriiñ an daou ginnig pleustrek-mañ : 1) evit an emrenerezh (tezennoù poloniat III,4) ha 2) evit ar frankiz-disrannañ. Er poent-se end-eeun emañ an diforc'h nemetañ etre hon raklunioù. Daoust ha n'eo ket sklaer ez eo an hini kentañ a zo kempennelour ha war ar c'hraf-se end-eeun disheñvel diouzh an eil ?

perant
Briant
Fellec'h
vzant

emell

sevenadurel
ch
ne
steje
e
200

Wann
ha
hann
ous
elfenn
io
d'ober
keval
i
pej
Stalaj
y
an
ne
vourc'hizel
pe
e

Ur c'hemm kempennel eo an hini na stroñs ket diazezoù galloud ar renkad sujer, nad eo nemet ur goulezad eus he ferzh, pa zalc'h he sujerezh. Ur c'hemm dispac'hel a zisfont ar galloud betek en e ziazezoù. Er raklun broadel, ar gempennelouriezh ne lam ket holl vrientoù ar vroad sujer; ne savel ket kevatalded klok ar gwirioù; ne zispenn ket an holl furmoù a waskerezh broadel. Ur vroad "emren" ned eo ket kevatal a wirioù d'ur vroad "riek"; ar geneiled poloniat ne vijent ket chomet hep henn merzout ma ne zalc'hjent ket (evel hon armerzhelourion gozh) da zianaout dezrannerezh ar c'healennoù hag ar rummennoù politikel. Norge emren a biae betek 1905, evel rann eus Sveden, un emrenezh frank-tre, met n'edo ket kevatal a wirioù da Sveden. Dre zisrannañ en he frankiz n'eo ken he deus diskouezet ent embregel hag anataet he c'hevatalded wirioù (lavaromp etre krommelloù en deus an disrannadur dieub-se krouet an diazez d'un nesadur strishoc'h ha gwerinekoc'h, soliet war gevatalded ar gwirioù). Keit ma oa Norge emren hepmuiken, ar vrientinelezh svedat a biae ur brient ouzhpenn; ar brient-se zo bet, n'eo ket skañvaet (anien ar gempennelezh zo skañvaat an droug hanann he lemel), met freuzet mik dre an disrann (pennañ azon eus dispac'hegezh ur raklun).

"Evit gwir, ez eus un diforc'h pennaennel etre an emrenezh, e kement ma'z eo ur c'hempennadur, hag ar frankiz da zisrannañ, e kement ma'z eo ur gread dispac'hel. Direndael eo se. Hogen un taol-kempenn, evel ma oar pep hini, ned eo alies er pleustr nemet ur c'hammed war-du an dispac'h. An emrenezh eo end-eeun a ro d'ur vroad dalc'het dre an nerzh e diabarzh ur riez an tu d'en em savelañ da vat en ur c'horf broadel, da zaspugn, da zeskiñ anaout ha frammañ he nerzhoù, da zibab ar c'houlz gwellañ evit diskleriañ... er c'hiz norgeat : ni, Dael emren ar vroad-mañ-broad pe an tiriad-mañ-tiriad, a ziskler en deus tsar an holl Rusiaoù paeuzet a vezañ roue Polonia, h.a.. Ouzh kement-mañ ez arbenner peurliesañ e vez skaret seurt kudennoù gant brezelioù ha n'eo ket dre ziskleriadurioù. Reizh eo : hogos bepred, gant brezelioù (). Dleout a rafed evelkent en em c'houlenn hag un hevelep arbennadenn ouzh raklun politikel ur strollad dispac'hel zo reizhpoell. Daoust hag enep ar brezelioù hag an dispac'hioù emamp pa vezont graet evit ar reizhded hag evit mad ar broleteriezh, evit ar werinelezh hag ar sokialouriezh ?" LENIN

Teskad ar Socialdemokrat 1, here 1916.

- (24) "A-greiz prederioù hag enkrezioù ar stourm evit bevañ, evit an tamm bara, ar vicherourion rusiat ne c'hellont ha ne zleont ket ankouaat ar gwaskerezh broadel a vez o pouezañ war ar milionoù a arallgeneliz annezet e Rusia. Ar vroadelezh niverekañ, - Rusiz, - a ra 45 % eus poblañs hollet an Impalaeriezh. War 100 annezad, ouzhpenn 50 zo arallgenel.

"Hag ar boblañs dirveur-se zo dezhi doareoù-bevañ krisoc'h c'hoazh eget ar re a ra planedenn ar Rusiad.

"Al leviadur a waskerezh broadel zo ul leviadur a rannerezh broadel. War un dro ez eo ul leviadur a vreineriezh reizhiadek eus emskiant ar bobl. War genenebadur lazioù an tudadoù disheñvel, war bistri-

adur bred ar yoc'hoù dizesk ha brevet e vez ar C'hant-Du o tiazazañ o jedadurioù. Kemerit forzh petore torch trac'hilstourmer, hag e welot e vez heskinerezh arallgeneliz, an isadur d'ar c'hendisfiz etre ar c'houer, ar bourc'hiz bihan pe an dornwezhour rusiat hag ar c'houer, ar bourc'hiz bihan pe an dornwezhour yuzev, finnat, poloniat, georgiat, ukrainat, o vagañ noueañs ar C'hant-Du.

"Hogen ar renkad vicherour he deus ezhomm a unvaniezh ha n'eo ket a zisranniezh. N'eus dezhi gwashoc'h enebourion eget an treuzvarnioù hag ar brizhkredennoù barbar ledet gant he gelenion e-touez ar yoc'hoù bratellet. Un arm daoudroc'h eo gwaskerezh an "arallgeneliz". Diouzh un tu e sko an arallgeneliad, diouzh an tu all e sko ar bobl rusiat.

"Setu perak e rank ar renkad vicherour en em ziskleriañ uhel ha fraezh enep pep gwaskerezh war an tudadoù.

"Ouzh difreterezh ar C'hant-Du a glask distreiñ hec'h evezh dre heskinañ an arallgeneliz, e tle enebiñ dre he c'hredenn start ez eo diziouerus ar gevatalded wirioù klok, an dilez leun ha klok eus forzh pe vrient a-berzh forzh pe vroad." LENIN, Kevatalded wirioù ar broadoù, Put' Pravdy 62, 16 ebrel 1914.

"Un nerzh etrevroadel eo ar c'hevala. Evit trec'hiñ warnañ e ranker diraez unvaniezh etrevroadel, breudeuriezh etrevroadel ar vicherourion.

" () Ar vicherourion ne zleont ket ankouaat he deus ar gevalaouriezh rannet ar broioù en un niver bihan a vroadoù gwasker, impalaerour, piaouer d'an holl wirioù ha brientoù, hag en un niver bras-kenan a vroadoù gwasket, suj pe damsuj, en izelded dezvel. Brezel 1914-1918, torfedus ha kilstourmus mar boe, en deus donaet ar rannadur-se ha, dre-se, kresket ar gonnar hag ar gasoni. E-doug ar c'hantvedoù, ez eo bet berniet an daerijenn hag an disfiz a-berzh ar broadoù en izelded dezvel ha suj a-enep d'ar broadoù impalaerour o gwask, a-berzh broadoù evel Ukraina a-enep da vroadoù evel Rusia.

"Ur c'hevredadur darbennet e pep frankiz gant ar broadoù a fell dimp kaout, ur c'hevredadur na c'houzañv feulster ebet a-berzh ur vroadouzh unan all, ur c'hevredadur soliet war ur fiziañs klok, war ur c'henasant peurzieub. Ne oufed seveniñ un hevelep kevredadur en un taol; ret eo e c'hounit dre ul labour leun a basianted hag a evezhiegezh, evit chom hep trenkañ an traoù, hep broudañ an disfiz, evit lakaat da steuziañ an disfiz lezet war o lerc'h gant kantvloaziadoù a waskerezh a-berzh ar berc'henned douar hag ar gevalaourion, gant ar berc'hentiezh prevez hag ar c'hasonioù enaouet e-ser ar rannadurioù hag an adrannadurioù anezhi." LENIN, Lizher da..., sl. (9).

(25) "Hag estren eo santad al lorc'h broadel dimp-ni, proleterion rusiat emouiziek ? Nann, evel just ! Hon yezh hag hon bro a garomp; ar pezh a bleustromp ar muiañ d'ober eo diorren he yoc'hoù labourer (eleze an nav dekvedenn eus he foblañs) betek live ur vuhez emouiziek a werinourion hag a sokialourion. Ar pep poaniusañ evidomp eo gwelout ha santout ar feulsterioù, ar gwaskerezh, an heskinadurioù a c'houzañv hon mammvro gaer digant ar vourrevion tsarel, ar vrientinion

*Fraezh
troc'h
Fall-dant*

stivony

hag ar vourc'hizion. Lorc'h zo ennomp p'o deus ar feulsterioù-se lakaet harzerezhioù da sevel en hon touez, e metou Rusiz; pa'z eo savet eus ar metou-se RADIŠČEV, ar gerzuidi, an dispac'hourion vilen (raznočincy) eus 1870-1880, p'he deus ar renkad vicherour rusiat krouet e 1905 ur strollad politikel yoc'hek galloudus; p'en deus ar moujik rusiat kroget war un dro da vezañ gwerinour ha da ziskar ar pob hag ar gourferc'henn douar." LENIN, A-zivout lorc'h broadel Rusiz, Sokial'demokrat" 35, 12 kerzu 1914.

+ RADIŠČEV (1749-1802), skrivagner rusiat, denelour dispac'helour. Kerzuidi, dispac'herion a orin brientinel rusiat a stourmas enep d'ar serevezh ha d'an unpenniezh; un darsavadenn armet a aozjont d'ar 14 kerzu 1825. Bilened, eneberion all d'an tsar-elezh o tont eus ar c'henderedù bihanvourc'hizel, kloerel, kouerel, kenwerzherel

Lizher da A.V.LUNAČARSKI, Maodiern soviedel ar Sevenadur.
18.I.1920.

Keneil Lunačarski,

An dro am eus bet nevez 'zo, gant kerse ha gant mezh, da gaout evit ar wech kentañ anaoudegezh ouzh Geriadur brudet DAL.

Un dra kaer-meurbet eo, met ur geriadur rannvroelour ha dispredet. Daoust ha ne ve ket poent ober ur geriadur eus ar rusieg arnevez, lavaromp, ur geriadur eus ar gerioù arveret hiziv ha gant ar glas-eion, adalek PUŠKIN betek GORKI.

Ha mar lakafed 30 gouizieg war al labour, o reiñ dezho lodennvoued emgannerion al Lu Ruz ?

Petra 'lavarfec'h eus ar mennoz-se ?

Hep ober trouz, komzit eus se gant an arbennigourion, ma n'ho tirenk ket, ha roit din hoc'h ali. Ho LENIN.

Emb. Pravda 21, 21 genver 1940.

V.I.DAL (1801-1872), teodyezhour ha tudoniour rusiat, aozer Geriadur reizhennek ar rusieg bev.

(26) "Raktal e kemeras LENIN perzh er gaoz.

"- Dihun an nerzhoù nevez, o labour evit krouiñ un arz nevez e Rusia soviedel, kement-se zo mat, zo mat-kenan. Ar feulster a ziskouezont en o lusk da ziorren zo aes da gompren ha talvoudus. Amzer gollet ar c'hantvedoù tremenet a rankomp hag a vennomp azgounit. Ur goadur reustlek, enklaskoù terzhiennek davit gerioù-stur nevez o kanañ hiziv an "hozanna" da froudoù 'zo eus an'arz pe eus ar preder hag a youc'ho warc'hoazh "kroazstagit eñ", - kement-se ne dec'himp ket dioutañ.

"- Emañ an dispac'h o tieubiñ an holl nerzhoù manet en hualoù betek neuze hag o lakaat da sevel war c'horre ar vuhez. Setu amañ ur skouer a-douez re all. Soñjit el levezon o deveze war hon liverezh, hon c'hizellerezh, hon adeiladerezh gizioù ha froudennoù al lez impalaerel, koulz ha blazioù hag albac'hennoù ar vrientinion hag ar vourc'hizelezh. Er gevredigezh diazezet war ar berc'hentiezh prevez e labour an arzour evit an nevid, ezhomm en deus a

brenerion. Hon dispac'h en deus dieubet an arzourion diouzh ar rediezhoù displeber-se. Graet en deus eus ar Stad soviedel o difenner hag o arval. Kement arzour a sell outañ e-unan evel un arzour en deus ar gwir da grouiñ en e frankiz, hervez e uhelvennad, hep nep rediezh.

"- Hogen komunourion omp, evel just. Ne zleomp ket chom gant hon divvrec'h kroaziet ha lezel ar reustl da vont en e roll. Hon dlead eo sturiant an argerzh-se gant hentenengezh ha stummañ e zisoc'hoù. Ha pell, pell-kenan omp c'hoazh diouti. () Ni zo c'hoazh re nihilour el livezezh. Ar gened zo da virout ha da gemer evel skouer, zoken mard eo kozh. Perak treiñ kein d'ar gened wirion ha nac'h he c'hemer da boent-loc'hañ dre an abeg nemetañ ma'z eo "kocz" ? Perak azeuliñ an nevezded evel un doue a zleer azeuliñ hepken peogwir ez eo nevez ? Pebezh amoedigezh ! Kalz pilpouserezh zo aze, a dra sur, ha kehelerezh diemouez ar c'hiz arzel o ren e Kornog Europa. Dispac'herion vat omp, nemet e kredomp bezañ endalc'het, n'ouzon ket perak, da brouiñ ez omp, ni ivez, "barrek diouzh ar sevenadur arnevez". Me avat zo kalonek a-walc'h da ziskleriañ ez on ur "barbar". Ne c'hallan ket sellout ouzh an oberennoù ekspresionour, futurour, kubour hag "-ourioù" all evel diskouezadurioù uhelañ an ijin arzel. N'o c'homprenan ket. Ne roont tamm levezet din.

"Anzav a ris, evidon, e rae din diouer moarvat an organoù-merzout ret da intent perak e ranke un tric'horn lakaet e-lec'h ar fri bezañ eztaol arzel un ene entanet, hag ul lusk d'an ober dispac'hel treuzfurmiñ korf an den, ar gevanenn heneuz-se a organoù, en ur sac'h disneuz, frammet war daou skas dibennet gant div forc'higell pemp biz.

"LENIN a c'hoarzhaz gwalc'h e galon.

"- Ya, Clara ger, n'eus mann d'ober, kozh omp-ni hon-daou. A-walc'h eo dimp chom yaouank en dispac'h hag en em gavout en e renkoù kentañ. Divarrek da vale e blein an arz nevez, e stlejimp en e lost."

Clara ZETKIN, in Lenin evel ma voe, eñvorennoù kemprediz, 1958.

- (27) "Emañ ar vicherourion er bed a-bezh o krouiñ o sevenadur dezho, ur sevenadur etrevroadel, prientet a bell 'zo gant labour kampourion ar frankiz hag enebourion ar gwaskerezh. Ouzh ar bed kozh, bed ar gwaskerezh broadel, an arvelloù broadel pe ar c'houbarzhegezh vroadel emañ ar vicherourion oc'h enebiñ ~~ar~~ bed nevez ^{eus} unaniezh *etre* labourerion an holl vroadoù, ma n'en devez lec'h brient ebet, nag an disterañ gwaskerezh eus an den gant an den." LENIN, Ar renkad vicherour hag ar gudenn vroadel, Pravda 106, 10 mae 1913.

- (28) "Pep broad kempredel zo enni div vroad, a lavarimp d'an holl vroadelsokializ. Pep sevenadur broadel zo ennañ daou sevenadur broadel. Bez' ez eus ur sevenadur rusiat gant re PURIŠKEVIČ, re GUČKOV ha re STRUVE, met bez' ez eus ivez ur sevenadur rusiat merket gant anvioù ČERNYŠEVSKIJ ha PLEXANOV. Heñveldra, ez eus daou sevenadur ukrainat, evel ma'z eus daou ivez en Alamagn, e Frañs, e Saoz, gant ar Yuzevion, h.a.. Mard emañ an darn vrasañ eus ar vicherourion

ukrainat dindan levezon ar sevenadur rusiat, e ouzomp ervat emañ, e-kichen mennozioù ar sevenadur rusiat kloerel ha bourc'hizel, mennozioù ar werinegezh hag ar sokialdemokratiezh oc'h embreger o levezon ivez. ()

"Mar lez ur marksour ukrainat e gasoni gantreizh ha naturel rik ouzh ar waskerion rusiat da risklañ betek treiñ ha pa ve un dist-erig, ha pa hepken e stumm ur santad a enebiezh, ouzh sevenadur proleterel hag oberenn broleterel ar vicherourion rusiat, e risklo dre-se e-unan e lagenn ar vroadelouriezh vourc'hizel." LENIN, Notennoù dezvarnel war ar gudenn vroadel, Prosveščenie 12, 1913.

- (29) "Seul emouesoc'h ma'z omp ez eo ret en em unaniñ, seul gendrec'h-etoc'h ma'z omp ez eo dic'hallus kas an argad ouzh an aotokratiezh hep un unaniezh klok, seul greñvoc'h ez anad e rankomp kaout ur framm emgann kreizennet." LENIN, Ar gudenn vroadel en hon raklun, Iskra 44, 15 gouere 1903.

"N'omp ket, tamm ebet, a-du evit ma ve dre ret broadoù bihan; a-du omp, ha groñs, pep tra o vezañ heñvel a-hend-all, gant ar c'hreiz-ennerezh hag a-enep uhelvennad bihanvourc'hizel ar c'heñverioù kevreadel." LENIN, A-zivout lorc'h..., sl. (25).

"Diouzh savboent stourm dispac'hel ar vicherourion saoz eo e c'houlenne MARX e 1869 disrann Iwerzhon diouzh Bro-Saoz. Hag e lavare ouzhpenn : "Ha pa ve dav, goude an disrann, disoc'hañ gant ur c'hevread". N'eo nemet dre eztaoliñ an arc'hadur-se e c'halle MARX diorren evit gwir ar vicherourion saoz en ur spèred etrevroadelour. () Evel-se hepken e c'halle, - en eneb da veulerion ar c'hev-ala a youc'he d'an utopiezh ha d'an dic'hallusted da savelañ ar gwir-disrannañ evit ar broadoù bihan, hag a embanne arakadegezh an tolpadur n'eo ket hepken armerzhel met c'hoazh politikel, - difenn arakadegezh an tolpadur-se savelet en un doare nannimpalaerour, ha difenn annesadur eus ar broadoù diazezet n'eo ket war ar feulster, met war unanadur dieub proleterion an holl vroioù."

LENIN, An dispac'h sokialour..., sl. (10,18,20).

- (30) "Kiriek eo evit un darn ar volcheviked mard eo disoc'het an drouz-izezh brezelel gant difloskadur ha dismantradur Rusia. Gwashaet kalz o deus diaesterioù ergorel ar saviad ma edont dre ar ger-stur o doa kemeret da benn-goaf d'o folitikerezh "gwir ar broadoù da emsavelañ" pe, dikoc'h, dre ar pezh a zo a-dreñv ar frazennadur-se : dismantr Rusia evel riez. Ar reolenn embannet dizehan, gant ur bennegezh a gelennadour, eus ar gwir o doa broadelezhioù diseurt an Impalaeriezh rusian da zivizout o-unan o zonkad, "betek, hag e-barzh, saveladur Stadoù dizalc'h krenn diouzh Rusia" oa unan eus luganoù LENIN hag e vignoned pa savent enep impalaerouriezh MILIUKOV ha hini KERENSKIJ, an ahel a voe d'o folitikerezh diabarzh goude darsav here, an endalc'h eus kensavenn ar volcheviked e Brest-Litovsk, an arm nemetañ o doa da enebiñ ouzh savlec'h-nerzh an impalaerouriezh alaman.

A N E M S A V H A G A R V R O (2 4)

DANEVELLOU OBEREREZH

Kentelioù nevez embannet gant S.A.D.E.D.

Abaoe derou 1970 en deus S.A.D.E.D. embannet :

Lennegezh : An eñvorenourion : Yeun AR GOW, Jarl PRIEL, Youenn CLIER. Roll an eñvorenourion en un emsav hag en Emsav : deskrivadur ar bed kozh war e zistruj hag ar bed nevez war e ziwan. Ne vez diles ar roll-se, hag an eñvorennoù ne vezont lennegezh wirion nemet mar bez an eñvorenour, n'eo ket un hanezour hep krap war ar bed, met ur c'hensaver eus istor ar vro. (Brb-110).

Istor : Breizh eus 1930 da 1939. An eil Emsav (2). Koemp Wall Street hag an enkadenn armerzh-bed. Ar renadoù faskour. Talbenn ar bobl. Disleberadur herrek armerzh Breizh ha strivoù garv pobl Vreizh d'en em azasaat ouzh ar bed arnevez. Strollad Emrenerion Vreizh ha dilennadegoù 1930. Enkadenn 1931 ha disrann ar gevreadelourion. Gwalldaolioù Gwenn ha Du. Bruderezh gourzhtroüs Breizh Atao. Ar Strollad Broadel, Stur, ar forc'hadur diouzh an dispac'h hag ar riskladur er faskouriezh hag er rannvroelouriezh. An Emsav toc'hor e derc'hent an eil Brezel-Bed. (Han-107).

Breizh eus 1939 da 1945. An eil Brezel-Bed. Ar "brezel iskis" ha trec'hioù ar riezoù faskour. Ar feur-emglev alaman-soviedel hag argad U.R.S.S.. Ar brezel japanat-amerikan. Stalingrad ha faezhidigezh ar riezoù faskour. Breizh er brezel; an dalc'hidigezh; Breizh ha Vichy. Kadouriezh Strollad Broadel Breizh. Ar Résistance. Levezon ar faskouriezh war gealiadur ar vroadelourion vrezhon. Tezennoù Stur. L'Heure Bretonne. Disrann ar Strollad Broadel hag ar Bezen Perrot. (Han-108).

Breizh eus 1945 da 1958. Ar bed nevez disoc'het diouzh ar brezel. Rannadur an drec'hourion e daou vloc'h. Striv an Amerikaned da astenn dalc'h o armerzh dre ar bed. An Unaniezh Soviedel hag ar broadoù amheulier. Dispac'h Sina ha brezel Indezsina. An Trede Bed ha kudenn an isdiorreadur. Derou ar stourmoù armerzh e Breizh. Difloskadur ar Mouvement Breton. An Emsav er geto hag enkadenn ar bloavezhioù pemont. Al Liamm ha stourmad an doare-skrivañ. Al luskadoù ledemsavel ha folklorrel. (Han-109).

Douaroniezh : Diazezoù kalvezel an armerzh arnevez. An danvezioù krai pourchaset gant ar gounezerezh hag ar c'hondon; danvezioù bevañs, danvezioù gounezel pleusket gant ar greanterezh, ar metaloù, an danvezioù gremm. Morhenterezh hag aerhenterezh. (Don-110).

Roll diwezhañ ar c'hentelioù embannet gant S.A.D.E.D. a gaver war Emsav 28/127, EMVR-66.

NOTENNOU POLITIKEL (1 2)

FRAMM AR RIEZOU

II. - RIEZOU KEVREADEL (diwezh). III. - RIEZEREADOU

Ar gevreadelezh amerikan.

Gant an Amerikaned e dibenn an 18^t kantved e voe ijinet ar riez kevreadel arnevez. Goude bezañ, etre 1781 ha 1787, arnodet ar gengreriad, reizhiad nemeti anavezet betek neuze, ha kavet ganti diaesterioù bras, - c'hwitadenn Kuzuliadeg Annapolis e 1786 pergen, - e tivizas ar Stadoù klask un hent nevez pa vodjont Kuzuliadeg Philadelphia e 1787. Divizet e voe unaniñ ar Stadoù en ur riez dindan ul levierzh unel o terc'houezañ ar vro a-bezh er par etrevroadel, en ur lezel gant pep Stad un darn vras eus he dizalc'hted hag eus he beli stadel.

An diforc'h bras etre ar framm nevez hag ar framm kengreriadel eo e veze ensavet darempredoù war-eeun etre pep keodedour ha levierzh ar c'hevread. Er gengreriad, en eneb, ne anaveze pep keodedour nemet levierzh e Stad hag an darempredoù etre ar Stadoù oa darempredoù etre o gouarnantoù hepken, - ar pezh a zegase, en degouezh amerikan, kudennoù diziskoulm, da skouer pa nac'he ur Gouarnamant Stad plegañ da gemennadurioù Gouarnamant ar Gengreriad.

Levierzh ar Stad kevreadel amerikan a c'hoarvez eus un Dael, ar C'huntell (Congress), hag ur Penn riez, al Leviour (President). Amparet eo an Dael gant div vodadenn : Kambr an Derc'houezourion, dilennet a-genfeur gant niver ar vouezhierion, hag ar Sened, dilennet a-genfeur gant niver ar Stadoù (daou senedour a vez dre Stad). Kenlabourat a ra ar Sened ha Kambr an Derc'houezourion da zougen an dezvoù ha da sevel ar c'hellidsteuñv. Ouzhpenn-se e ro ar Sened "e ali hag e asant da anvidigezh an amaezhidi ezholet gant al Leviour, hag ivez da sinidigezh

ar feurioù".

Organ an unelezh eo al Leviour; gant ar Besleviour ez eo an den nemetañ dilennet gant pobl a-bezh ar Stadoù-Unanet. E roll zo eveshaat erounezadur dezvoù ar riez ha leviañ en amboaz-se oberiadegezh ar maodiernezhioù. Al Leviour ned eo ket endalc'het d'an atebegzh politikel dirak ar C'nuntell; piaouañ a ra galloudoù bras-tre, ouzh o embr-eger e-unan, disheñvel er c'heñver-se diouzh ur Penn Stad daeliek.

Al Lez Uhelañ kevreadel a zeu da glokaat ar Gouarnamant Kevreadel. Ur roll pouezus he deus : er Stadoù-Unanet, ken er par kevreadel, ken e par ar Stadoù, ez eo al lezioù-barn unelreizhataerion an holl wirioù. Seurt ober politikel embreget dre hent ar barnerezh a roas tro da gomz eus "Levrierezh ar Varnerion" (sl. ivez Emsav 31/222 ha 36/379).

Kresket eo niver ar Stadoù eus 13 e 1776 da 49 e 1958 (Alaska) ha da 50 e 1959 (Hawaii). Dre ret ez eus ur furm republikan da Vonreizh pep Stad. En devoud, lakaet er-maez an Nebraska, unkambrek, ez eo heñvel framm ar Stadoù-ezel ouzh framm ar Stad kevreadel. Dre bennaenn, e chom gant ar Stad kevreet kement galloud nad eo ket roet gant ar Vonreizh d'ar Stad kevreadel (reizhiad ar gwirioù ezhleg). A-du-rall, an dek enkemmad kentañ (1), - anezho an Diskleriadur Gwirioù amerikan, - darbennet e 1791, o deus lakaet strishadurioù bras war ar galloud kevreadel.

Etre 1787 ha hiziv ez eus bet meur a neuennad e savlec'hioù keñverrel ar Stad kevreadel hag ar Stadoù kevreet.

E derou an 19^t kantved, dre berzh damkaniezh ar "gwirioù empleg" termenet gant al Leviour JEFFERSON da geñver destagadur al Louisiana e 1803 ha darbennet da c'houde gant al Lez Uhelañ, e tennas ar gembeli gevreadel da greskiñ. Harzet e voe al luskad-se gant un dasstourm nerzhek, damkanet gant CALHOUN (1782-1850) a venne gwelout ar riegezh evel piaou ar Stadoù hag ar c'hevread evel ur c'hevredad Stadoù bodet a gengrad. Hervez ar meizadur-se edo gant ar Stadoù ar gwir da c'houarzhañ ha da zidalvoudekaat greadoù ar galloud-kreiz; en degouezh grevusañ e chome ganto ar gwir da zigevrediñ. Met, dres, Brezel an Digevrediñ (1860-1865), kollet gant dalc'hidi riegezh ar Stadoù, a lakaas termen d'al luskad diazezet war meizadur kevreadel ar Stadoù-Unanet. Addiogelaet e voe dreistelezh ar Stad kevreadel : trec'h oa ar riez war ar Stadoù.

Eus 1870 da 1940 e ren ar gevreadelezh daouelour, ar Stadoù o virout en o c'herz kement galloud nad eo ket fiziet gant ar Vonreizh er Stad kevreadel. Gant an enkadenn armerzh bed hag ar brezel avat e koazhas an tachennoù miret-se. Dreistbeli o deus bremañ an ensavadurioù kevreadel war ensavadurioù ar Stadoù. Un devoud a veneger evel arouez an emdroadur-se : e 1962, e reas al Leviour KENNEDY da C'houarnour Stad Mississippi plegañ ha doujañ pevarzekvet enkemmad ar Vonreizh, an hini a verz ouzh ar pennadurezhioù lec'hel arverañ o galloud evit dispartiañ ar gouennoù (enrollidigezh ar studier du MEREDITH e Skol-Veur Oxford).

Ar gevreadelezh helvetiat.

"Emañ neuziadur glenn Helvetia e-unan e devoud diwanadur un niver a Stadoù bihan emren, techet dre natur d'ur renad politikel gant ul levierzh dizalc'h ha personel. () An arnod nemetañ a greizennerezh heut ha dijaoj, - renet a-hend-all dre nerzh un damani estren, - amparadur Republik Helvetia, a c'hwitas truezus" (2).

Koulskoude e 1848 ez eas Helvetia a gengreriad da riez kevreadel. Seizh kanton katolik, savet ganto ur c'hevread distag, ar Sonderbund, a voe trec'het dre an armoù ha gougevanet ouzh ar "gengreriad" treuz-furmet e-keit-se en ur riez kevreadel diouzh ar patrom amerikan; div vodadenn a rae an Dael : Kuzul ar Riez, dilennet gant ar bobl a-bezh, ha Kuzul ar Stadoù o c'hoarvezout eus daou gannad dre ganton. E-lec'h avat lakaet e penn ar riez ul Landamman, keveleb al Leviour amerikan, e voe savelet ur c'horf-stroll, ar C'huzul Kevreadel, dilennet gant an Dael hag o chom en he dalc'h.

Dre azgweladur kevan 1874 e voe al Lez-varn Gevreadel kreñvaet ha lakaet da vezañ peurzalc'hus; enni e voe fiziet skaradur an arguzioù kevreadel, a oa bet betek neuze e kembeli an organoù politikel. Kembeliek eo Lez-varn Gevreadel Lausanne er breudadoù war vonreizhegzh an dezvoù kantonel; en eneb, ne c'hell ket barn an dezvoù riez. Ar strishadur-mañ a lez ar barnerezh helvetiat pell war-lerc'h ar barnerezh amerikan a-fet e roll el levierzh.

Elfenn lusker an dezvañ eo ar bobl helvetiat hec'h-unan, bennozh dreist-holl d'ar werinelezh dameeun (sl. Emsav 35/355-7) ensavet e 1874. Ar poblvouezhiañ, a oa en arver endeo er par kantonel, en deus roet lusk d'un argerzh unvaniñ kevreadel. "E-doug ar seikont bloavezh etre 1848 ha 1914 e voe azgwelet ar Vonreizh bep tri bloaz dre berzh un emdroadur kendalc'hel war greizennañ. E 37 vloaz, eus 1914 da 1951 ez eus bet tost da vat un enkemmad bep bloaz" (3). Koulskoude emañ Helvetia pell a vezañ ur Stad unelour. N'eus netra boutin etre ur c'hanton suis hag un departamant gall. Kresk ar c'hembelioù kevreadel ne zeu ket diwar gozhadur ar galloud kantonel, met diwar un astenn eus tachenn ar c'hefridioù kefleuniet gant al levierzh kevreadel, bez' ez eo "nebeutoc'h ur c'hresk eus ar c'hreizennañ eget eus ar stadelaat" (4).

Ar gevreadelezh alaman.

Un henvoaz eo al lieselouriezh en Alamagn, evel ma tiskouez ar c'hantvedadoù ma padas ar renad kengreriadel er vro-se. Tostañ dimp e kavomp ar Gengreriad C'herman (1815-1866) ha Kengreriad Norzalamagn (1867-1871). Abaoe 1871 ez eo bet Alamagn ur riez kevreadel, - lakaet er-maez ar bloavezhioù 1935-1945.

A) Ar riez wilhelmat pe Kaiserreich (1871-1919)

Ganti ez eo treuzfurmet ar gengreriad en ur riez kevreadel hag unanet Alamagn. Stadoù ar Gengreriad Norzalaman a gevre ouzh Stadoù Su Alamagn. Diouzh o emglevioù e tisoc'h Bonreizh ar 16 ebrel 1871.

Doareoù kengreriadel a chom war ar riez kevreadel wilhelmat. Un-penniezhoù eo ar Stadoù kevreet, - nemet an teir c'hêr hansaat. An darn vuiañ eus o riegezh a viront, en ur lakaat boutin etrezo meradur o lazioù strollel.

E piaou ar Bundesrat (Kuzul Kevreadel) emañ ar veli gevreadel uhelañ.

Anvet e vez leuridi ar Stadoù d'ar Bundesrat gant an tierned pennoù Stad, pep leuriad o kaout un niver a vouezhioù a-geñver gant

pasgwiz
 pouezded e leurier (etre 1 ha 17); endalc'hus eo al leuriadur. Ar vaodierned a bled gant ar greadoù pouezus, an amaezhourion gant ar re all; ur roll bras zo gant ar c'hengorioù pad. Kefridi ar Bundesrat eo derc'hel an unvaniezh etre ar Stadoù hag etre ar Stadoù hag an Impalaeriezh. Mar c'hwit an hent diplomatel e vez daveet an arguzioù dirak ul lez impalaerel evodet eus ar Reichstag (bodadenn riez) hag eus ar Bundesrat war un dro.

En devoud, dre berzh diouzh un tu unanadur personel an Impalaeriezh gant an Unpenniezh prusiat, diouzh an tu all berniadur an teir c'hefridiezh Kañseller ar Riez, Maodiern Arlevier Prus hag Arlevier ar Bundesrat, ez eo ar riez wilhelmat un unpenniezh vevnet. Bevennet ent wirel, ken gant ar Reichstag e par ar riez, ken gant ar Bundesrat e par ar Stadoù, e chom neoazh bras-kenan beli an Impalaer, - pa c'hell envel pe dizorniañ e gañseller, hemañ o vezañ anatebek dirak ar bodad-enoù.

france
 Etre 1871 ha 1918 ez a beli an Impalaeriezh war greskiñ diwar-goust beli ar Stadoù kevreet. Briegezh an Impalaer a voug hini Roue Prus. War un dro e kresk kembelioù an amaezhvaoù impalaerel (Reichsämter) betek gwiskañ warno ur roll a vaodiernezhoù, kement-se diwar-goust ar Bundesrat.

Hervez J.C.BLUNTSCHI, Bonreizh ar riez "a dremen e-biou da bep resiadur arvarus, o lezel dispis ar vevenn etre domani an hollenn ha hini ar parzhioù. Alies e vez roet d'ar riez ar gwir da zezvañ mar kav mat war danvezioù a chom, betek ma embreg ar gwir-se, e kembeli ar Stadoù. Da bennaenn e kemerer e tremen bepred gwir ar riez dreist gwir ar Stad : "Reichsrecht bricht Landesrecht". E-se, aotrouniezh ar riez a ya bepred war greskiñ. Astenn a gemer gant kement dezv a ra" (5).

B) Ar riez weimarel (1919-1935)

met war
 Ar riez weimarel, hanterhent etre ar riez kevreadel hag ar riez unelour kemplezh, a gemeras lec'h ar riez wilhelmat a oa hanterhent etre ar gengreriad hag ar riez kevreadel. Ganti e chom kevreadel framm ar riez. Ar Stadoù, anvet Länder, zo e piaou d'o dezverezh, d'o amaezh-ierezh, d'o barnerezh, eleze d'ur galloud stadel gwirion (Staatsgewalt) termenet gant Bonreizh an 19 eost 1918). Met o bevennoù tiriadel n'int ket digemm ken; koazhet eo o niver da 17; hag o derc'houezadur er

J Reichsrat zo kenfeuriek d'o foblañs. Kadarnaet eo en-dro pennaenn dreistelezh gwirioù ar riez war gwirioù ar Stadoù, ha spisaet ar wechmañ gwirioù ar riez.

Ar Reichsrat eo an organ kevreadel, anezhañ bodadenn derc'houezourion al Länder. Kalz en deus kollet eus kembelioù ar Bundesrat wilhelmat e gounid organoù ar riez, an Arlevier hag ar Reichstag. Da skouer, n'en deus ket ken ar gwir, piaouet diwar neuze gant levrierezh ar Reich, da zougen kemennadurioù amaezhel. Perzh a gemer en dezvañ, gwir kentodiñ ha kentaliañ en deus e-keñver ar Reichstag, - met ne c'hell ket herzel kerzh ur mennad lezenn. E asant ned eo ket ret da zarbenn an dezvoù. Dre e enebadur e c'hell, e degouezhioù 'zo, degas ur poblaters.

Ar Reichstag, kambr ar bobl, zo dezhañ ar gwir da gemmañ an dezvoù, gant pe hep emell ar bobl. Dre-se, gant ar renad weimarel ned eo ket gwarezet ar gevreadelezh : n'eus harz ebet a-berzh Bonreizh o tifenn an dezvad kevreadel na zoken o tiogelaat bezoud al Länder. "Ar riez weimarel zo dezhi da organ uhelañ ar bobl alaman. N'eus ket anezhi ur riez kevreadel (Bundesstaat) met ur riez pobllel (Volksstaat)" (6). Hogen ar galloud pobllel ne zlee ket mougañ ar galloud kevreadel. Steuziañ a rejont o-daou a-gevret.

K) Ar riez hitlerat (1935-1945)

Kreizennet e voe an Trede Reich diouzh skeudenn ar strollad politikel he c'hrouas. Freuzañ a reas buan emrended al Länder hag an ensavadurioù kevreadel. Lamet e voe ar Reichsrat d'ar 14 c'hwevrer 1934. Pastelloù amaezhel a chome, digreizennet a-walc'h, met hep emplegadur politikel. Pa voe diskaret ar renad edo o prientiñ rannidigezh an diriegezh e 30 pe 40 ranndir (Gau).

D) Republik Kevreadel Alamagn-Gornog

Ar Republik kevreadel a verk un dasstourm ouzh ar c'hreizennadur hitlerat, hag ivez ouzh gwanded ar gevreadelezh weimarel. Bondezv an 8 mae 1949 "zo ha, muioc'h c'hoazh, he deus klasket bezañ kevreadekoc'h, nebeutoc'h kreizennus eget Bonreizh 1919. () Eviti da azverañ aoz an

tiriadoù, e ro brasoc'h pouez d'al Länder evel unvezioù emren" (7). Ar Bundesrat, organ kevreadel, a gemer levezon en-dro e-keñver ar Reichsrat. Ur gwir gouarzhañ dezverezhel groñs en deus, a c'hell koulskoude bezañ skoilhet gant ur vouezhiadeg eus ar Bundestag. Ul Land a vez daskemmet e wirioù bonreizhel mar sav an daoufarzh eus Gouarnamantoù al Länder a-du gant an daskemmadenn. Diazgweladus eo pennaenn rannadur ar vro e Länder, eleze furm gevreadel ar riez, ha pennaenn perzhiadur al Länder en dezverezh.

Ar gevreadelezh soviedel.

A-wechoù ez anver "hengounel" ar c'hevreadelezhioù amerikan, helvetiat hag alaman, - ar riez kevreadel o tisoc'hañ ganto eus emdroadur ur gengreriad, - evit o enebañ ouzh kevreadelezh "dispac'hel" an Unaniezh Soviedel. Dibaregezh houmañ eo a) e voe un torr krenn ha feuls etrezi hag an Impalaeriezh tsarel unelour, kreizennet, dedeuzour b) e voe ar gevreadelezh soviedel diazezet evel benveg eus ar renad komunour ha "furm dremeniat war-du unanadur labourerion ar broadoù dis-eurt" (8).

Kemplezh eo istor ar ratozh kevreadel er varksouriezh. Kondaonet gant MARX hag ENGELS ha gant LENIN d'o heul, e voe degemeret evelkent gant hemañ diwezhañ e 1917 war-lerc'h un dispac'h ma o doa c'hoariet ar mennozhioù broadel ur roll hogos ken bras hag ar sokialouriezh. Evel a ouzer, n'eo ket unvan poblañs an Unaniezh Soviedel, met dasparzhet e tudadoù lieskenel, un tregont en holl. Ne voe diazezet da vat ar gevreadelezh soviedel nemet e 1936 dindan levezon STALIN. Termenet e voe evel "tudadel en he furm, komunour en hec'h endalc'h" (9).

A) Ar gevreadelezh soviedel a bled gant broadelezhioù, ha n'eo ket gant Stadoù

Fellout a ra da framm politikel ar riez bezañ un adsked feleun eus dasparzh an tudadoù dre an diriegezh. Savelet ez eus bet un teskad strollelezhioù kemplezh kevreet kenetrezo hervez pevar rumm pe pevar

"gwiskad" :

adren
humbler

- Ar republikoù kevreet. Eus 4 e 1924 ez int aet da 16 e 1940. Ur republik kevreet (sojuznaja respublika) a c'hell dont diwar herouezadur ur republik emren (avtonomnaja respublika) pe ur rannvro emren (avtonomnaja oblast'), pe c'hoazh eus ur Stad dizalc'h diagent pe eus ur rann anezhi. Hervez STALIN e tle ur republik kevreet c'hoarvezout eus un milion a annezidi da nebeutañ ha bezañ enni un dudad trec'hel. "Riek ha kevatal o gwirioù" eo ar republikoù kevreet. Unanet int en o frankiz hag ar gwir o deus da guitaat an Unaniezh. Da heul enkemmadoù ar 1^{añ} c'hwevrer 1944, e c'hellont kaout o diplomaterezh hag o luoz dezho.

- Ar republikoù emren, c'hwezek anezho bremañ, o deus ivez ur vonreizh hag ul levrierezh dibarek. N'int ket riek avat, met emren hepken, - ne biauont ket kement a wirioù hag ar republikoù kevreet. Lamet e c'hellont bezañ zoken, evel ma c'hoarvezas e-doug an eil Brezel-bed gant an teir republik emren eus Alamaned ar Volga, Čečen-Inguš ha Kalmuk.

- Ar rannvroioù emren zo dezho un dezvad amaezhel nemetken, - keveleb int d'ar rannvroioù ordinal, met dre berzh ma klotont gant kenelennoù (tudadoù unkenel) diforc'h, o deus gwirioù dreist d'ar rannvroioù all : danzen o dezvad gant darbennadur Sovied meur ar republik kevreet o endalc'h; divizout ar yezh arveret er wazadurezh, er varnadurezh, en deskadurezh; bezañ reolet gant un ensav uheloc'h eget ar veli amaezhel savlec'hiet diouzhtu dreist dezho, eleze gant Kuzul ar Vaodi-erned pe Prezidiom ar republik kevreet.

- Ar ranndirioù tudadel, keveleb ar pastelloù-bro ordinal, disheñvel diouto dre ar gwir o deus da gaout ur c'hoskor amaezhel a hevelep kenel ganto.

Digevatalderioù bras zo etre ar Republikoù kevreet. Rusia, anvet Republik kevreat, zo enni daouzek eus ar c'hwezek republik emren, pemp eus an nav rannvro emren hag an holl ranndirioù tudadel, eleze 60 % eus poblañs holl ar riez. A-du-rall, unnek republik kevreet diwar

c'hwezek n'eus enno na republik emren, na rannvro emren, na ranndir dudadel (10).

Ar republikoù emren n'int ket derc'houezet e Sovied meur ar republik kevreet o endalc'h, met e Sovied ar Broadelezhioù a zo unan eus an div vodadenn riez, eben o vezañ Sovied an Unaniezh, - an div oc'h amparañ a-gevret Sovied Meur ar riez. E Sovied ar Broadelezhioù ez eus 25 kannad dre republik kevreet, 12 dre republik emren, 5 dre rannvro emren, 1 dre ranndir dudadel. Dreistpouez zo e-se gant Republik Kevreat Rusia, pa zileur 200 kannad.

Ar Prezidiom zo ivez warnañ doare ar gevreadelezh, peogwir ez eus ennañ 16 besarlevier, unan dre republik kevreet.

B) Framm kevreadel an Unaniezh Soviedel ne skoilh ket ouzh unded ar framm renkadel nag ouzh unded armerzhel ar riez

Unded ar framm renkadel zo diogelet gant :

- unded ar riezadelezh : pep keodedour zo riezad soviedel;
- dre an endalc'h evit pep republik da vezañ sokialour soviedel;
- dre an endalc'h evit pep republik da gaout an hevelep stern bonreizhel : ur sovied meur unkambrek, ur prezidiom, ur c'huzul ar vaod-ierned;
- dreist-holl dre vezañs ar Strollad Komunour, strollad unel kreizennet o piaouañ an holl staeloù-ren en Unaniezh, er republikoù, er rannvroioù hag er ranndirioù.

Unded an armerzh zo diogelet gant :

- ar c'hreizennadur e-ser ensavioù-kreiz an Unaniezh ^{evit kel} eus ar steuñverezh armerzhel, kellidel, kevredigezhel; bez' ez eus ur c'hellidsteuñv unel evit ar riez a-bezh; renet e vez ar c'henwerzh diavaez e stumm un unwerzhouriezh-Stad. Kreizennet eo ivez : amaezhiadur ar bankoù, an embregerezhioù greantel, gounezal ha kenwerzhel, ar postoù hag ar c'hehentif, meradur ar moneiz, ar c'hred, ar c'hretadurioù hag an amprestoù, trevekaerezh an atiloù hag ar c'hondon, ar c'hoadeier, an dour-eier, kedaozerezh ar stadegoù, an deskadurezh, dezvadurezh al labour. *lijer*

- framm an amaezhiezh ha rannadur ar maodiernezhioù e tri rumm :

a) Ar maodiernezhioù hollriezel, o ren war skourroù kreizennet-rik an amaezhiezh : maodiernezhioù an nijerezh, ar c'henwerzh diavaez, an armerezh, an douarouriezh, an ijinerezh tredanel, h.a..

b) Ar maodiernezhioù kevreadel-republikel o strollañ ar vaodiernezh riezal gant maodiernezh kevelep ar republik kevreet : ar maodiernezhioù politikel, re an diabarzh hag an diavaez, zo kevreadel-republikel.

k) Ar maodiernezhioù republikel o verañ ar greadoù e kembeli ar republikoù.

Daou duadur zo enta, evit ur gwel, er reizhiad soviedel : un tuadur kevreadel, o vont pelloc'h ent vonreizhel eget e nep riez kevreadel all, peogwir o deus ar republikoù kevreet ar gwir da zigevrediñ; un tuadur kreizennour, o vont ivez pelloc'h eget e nep riez all, peogwir e vez reolet pep obererezh politikel, kevredigezhel hag armerzhel gant levier gwerc'hel ar riez, ar Strollad Komunour.

Diaes eo evit gwir barn ar renad soviedel estreget diwar furmoù e Vonreizh, dre ziouer a stlenn war e arc'hwelerezh devoudel. Dav eo d'an aozerion labourat war goulakadurioù, ar pezh a ro da gompren an diforc'hioù bras-tre a zo etre ar priziadurioù a embannont (11).

III. - RIEZEREADOU

Ken kozh hag an istorvezh politikel eo ar riezereadoù pe, diouzh an anvadoù diseurt bet roet dezho, "totôn akaiôn sustèma" e gresianeg, "systema ciuitatum" e latin, "Staatenverbindungen" en alamaneg.

Ar riezoù ereet en doare-se zo etrezo darempredoù ensavadurel disheñvel diouzh an darempredoù etrevroadel ordinal : muioc'h int eget un ere kevratel skoulmet dre ur feur-emglev; muioc'h ivez eget an ere kalvezel ez eo da skouer ur c'henvarc'had; muioc'h ivez eget an ere politikel a saveler dre gevrediñ e sell d'un amkan diplomatel pe vrez-elel.

Bez' ez eus riezeread pa en em vod un niver a riezoù da amparañ ur c'hevelstrollad politikel diforc'h mat e-touez ar riezoù all. Meur a seurt riezereadoù a zeskriver : ar gengreriad, an unanad personel, an unanad trael, an unanadoù digevatalek (hag o isrummoù : Stad waz ha Stad pennaotrou, Stad warezer ha Stad warezet, Stad fiziadour ha Stad fiziet), an unanadoù frankaet.

Ar gengreriad.

Mar seller ouzh hec'h emroadur istorel, ez eo ar gengreriad kentfurm ar riez kevreadel. An diforc'h etre ur riez kengreriad hag ur Stad kevreet eo emañ an hini gentañ e piaou d'ar riegezh etrevroadel pe, evel ma lavarer kentoc'h hiziv, d'an dihanteradegzh etrevroadel (Völkerrechtsummittelbarkeit). Ar gengreriad zo un eread riezoù (Staatenbund), ar riez kevreadel ur riez-ere (Bundesstaat).

Ere diabarzh ar gengreriad a c'hoarvez eus engouestloù peurzalc'h-us hag, ent organel, eus aozadurioù etreriezel. Dre-se :

- ar gengreriad zo un unanad riezoù a wir etrevroadel, - gwelet hon eus ez eo ar riez kevreadel un unanad a wir bonreizhel (Emsav 37/30);
- ar gwir-digevredañ he deus pep riez-ezel;
- bevennet-strizh eo an tachenoù ma vez renet ar greadoù kengreriadel;
- dre o gouarnamantoù hepken emañ e darempred ar riezoù kengreriad; n'eus na tiriegezh voutin, nag organ-dezvañ pe -barn oc'h astenn o c'hembeli war boblañs hollel ar gengreriad;
- embreget e vez ar veli fiziet er gengreriad gant organoù boutin; an organ-leviañ, anvet alies dieta, zo ur c'huzul amparet gant Pennoù ar riezoù ha kannadourion a gemer o disentezioù a-unvouezh hag ad referend-um, eleze war an diviz ma vent kaougantet da c'houde gant o gouarnamantoù.

An unanad personel hag an unanad trael.

Dre an unanad personel e vez kevelstrollet div pe lies riez dre bersonded un tiern unel. Heuliad oa ar riezeread-mañ d'al lezennoù herezhel a lakae meur a gurunenn roueel war an hevelep penn.

An unanad trael oa disoc'h un dedroadur eus an unanad personel. An tiern oc'h unaniñ div riez a-ere e bersoned a strive da weañ liammoù organel etrezo. Da heul, ur gengreriad a zeue da glokaat ha da startaat an unanad personel.

An unanadoù digevatalek.

En unanadoù digevatalek e lez ar c'henurzhiañ al lec'h gant an isurzhiadur. Un ere a zalc'hiadegezh zo etre ar broioù.

Stad waz ha Stad pennaotrou

Ar wazelezh zo dezvad ur Stad lakaet dindan aotrouniezh politikel ur Stad all; savelet eo ent wirel, - ne c'haller ket komz enta eus gwazelezh armerzhel pe kravezel : e devoud ar wazelezh emañ an aotrouniadur politikel ha n'eo ket ar mestroniadur armerzhel. Ar wazelezh zo, ent istorel, an disoc'h eus un destagadur diglok pe, en eneb, eus ur frankizadur diglok. Emañ pe war hent an aloubadur pe, en eneb, an dizalc'hiadur. Egipt, da skouer, gwaz d'ar Porzh-Meur diwar 1840, dalc'het gant ar Saozon e 1882, gwarezet gant Breizh-Veur e 1914, a c'hounezas he dizalc'hiezh e 1936.

Stad warezet ha Stad warezer

Ur vro nad eo ket gouest da embreger he riegezh a vez lakaet dindan warezveli ur riez all, a embreg en he lec'h he gwirioù etrevroadel hag un darn eus he gwirioù diabarzh. Meur a seurt gwarezveliezh ez eus : gwarezveliezh trevadennel, gwarezveliezh a wir etrevroadel, damwarezveliezh amerikan. An dezvad a Stad warezet, evel ar wazelezh, ned eo ket padus : disoc'hañ a ra war an destagadur pe ar frankizadur.

Stad fiziet ha Stad fiziadour

Ar Stad fiziet, pe Stad e fiziadur, zo bet kentradet da geñver ar feurioù-peoc'h a glozas ar Brezel-bed kentañ : trevadenoù ar riezoù faezhet a voe fiziet gant Kevre ar Broadoù er riezoù trec'h gant ar gefridi d'o bleniañ betek an dizalc'hiezh politikel.

An unanadoù frankaet.

Ar skouer splannañ a unanad frankaet eo ar Commonwealth. Da gentañ kreizennet ha dalc'het dindan diharzveli, ez emdroas an Impalaeriezh trevadennel saoz war-du an emrenerezh hag an dizalc'hiezh, o kemer an anv a British Commonwealth hag en dibenn a Commonwealth hep mui adanv ebet. Steuziet o deus al liammoù a zalc'hiadegezh betek lezel al lec'h gant ur gumuniezh a lazioù; anvet eo bet an unanad-se "keveleriezh diavaez" (external association).

- (1) Enkennad g., daskemmadenn graet en ur mennad lezenn, ur vonreizh, h.a.
- (2) P.ETTER, La Démocratie suisse, Olten & Constance, 1934.
- (3) W.E.RAPPARD, La centralisation en Suisse, Revue Française de Science Politique 1951, p. 137.
- (4) id., ibid., p. 135.
- (5) J.C.BLUNTSCHLI, Ar Politikerezh 1879.
- (6) R.CARRE de MALBERG, L'Allemagne depuis la guerre, Paris, Strasbourg, 1925.
- (7) Ch.EISENMANN, Bonn et Weimar, Deux Constitutions de l'Allemagne, La Documentation Française 1337, 3 mezheven 1950.
- (8) V.LENIN, Tezennoù war ar c'hudennoù broadel ha trevadennel, Pravda 162, 24 gouere 1920.
- (9) Ober a ra Soviediz gant narodnost' evit menegiñ an tudadoù o deus degemeret un dezvad a emrenerezh en Unaniezh Soviedel. Ur ger deveret eus narod "kenel" ha "gwerin" war un dro eo. E rusieg e talvez narodnost' kement na "broadelezh", "pobl", "broadegezh". Bezant e chom an daou ster el lavar soviedel : narodno-demokrat-ičeskij a dalvez "gwerindemokratel"; hogen narodnost' poézii Puškina : "broadegezh barzhoniezh Puškin". Treiñ a reomp narodnost' gwech dre tudad, gwech dre broadegezh; evit heuliañ ur boaz a zo d'ober "broadelezhioù" eus tudadoù emren an Unaniezh Soviedel, e troomp ivez ar ger dre broadelezh, en troiennoù degemeret bremañ en hon yezh e-giz : Sovied ar Broadelezhioù, h.a..
- (10) Sl. ivez Birvilh broadel e broioù ar Reter, EMVR-71, Emsav 29/138 1969.
- (11) Sl. ivez An armerzhioù kengladel, Notennoù Armerzhel (11) & (12) Emsav 13/13 & 14/50 1968.

